

BARR-NEOL

WAR
feiz ha BREIZH



AN AOTROU BRETON, PERSON GWANAC'H DIDOULBAC'HET

Miz Mezheven 1972

PRIZ : 6 LUR

Niv. 73

TAOLENN

Barr-Heol, Kelc'hgelaouenn gatolik ?	p.	1
Bebekadom		4
Osgood		11
Sant Erwan		19
Korn an tiegezh, Keginerezh		22
Roll-meuzioù		23
Keleier emglev an tiegezhioù		24
Krommen ar gwreziouù		27
Paourkaezh plouk		29
Liva γ ha gwispon		31
Levriou hag embannadurioù		38
Tri anv-lec'h		40
Embannadurioù		49



BARR-HEOL ur gelaouenn gatolik?

Bez'ez eus darn hol lennerien hag en em c'houlenn a-wechoù :

- Daoust petra eo BARR-HEOL a-benn ar fin? Ne weler ket sklaer petra eo e garg el labour adlakaat Breizh en he flom? Pennadoù a bep seurt a vez ennañ hag a c'hellfe meur a hini anezho bezañ moulet war gelaouennoù all. « Marteze. Met ar gwellañ respont ez eo hemañ : « BARR-HEOL a zo BARR-HEOL ! ».

Met ar respont-se n'eo ket a-walc'h. Nevez'zo, ez eus bet komzet eus BARR-HEOL e Radio Breizh : n'o devoa ket bet lec'h keneiled BARR-HEOL da gemer gloar goude bezañ klevet ar skingasadenn. An displeger avat, a oa bet tapet berr ha n'en devoa ket bet amzer d'en em soñjal, ha c'hoazh e oa bet dilostet e gomzoù ! Radio- Breizh 'm eus aon ne da buan-buan en-dro e servij-kelaoua, rak graet e oa bet ar skingasadenn a gomzomp anezhi goude ma oa deuet er-maez BARR-HEOL PASK, an hini gouestlet d'an Aotrou Kalvez (Doue d'e bardono !) ha ne oa bet kaoz nemet eus niverenn Nedeleg !

Fellout a rae d'an displeger diskouez ez eo BARR-HEOL ur gelaouenn gatolik ha na harpañ e gaoz e komzas eus tri fennad : an hini diwar-benn Salmou an Aotrou Gall, person Eviaz (Psallite Domino) , hag eus ar prezegenoù graet gant an Aotrou Bourdellez da geñver ar gouelioù en enor da Varc'harid Fulup, e Pluned, ha da Fañch an Uhel, e Plouared, en hañv tremenet. Ur seurt displegadenn a dalveze tost da vat kement ha lavarout e oa BARR-HEOL ur gelaouenn a zevsion (ar pezh ne vefe un dizenor n'eus forzh penaos !).

Despetus ez eo kement-se, pa c'helle ur seurt skingasadenn ober gaou ouzh ur gelaouenn vrezhonek pa'z eus dija ken nebeut anezho.

Iskisoc'h a se avat, ne oa ken ar skingasadenn-se, pa ne rae anv ebet eus kontadenn Nedeleg (Ur Veaj Dic'hortoz) gant E. Barzig goude bezañ meulet labour hor c'henlabourer evit e levr « BUHEZ HA FALTAZI », ha ma klevet kerkent goude, koulz lavarout, mouezh ur vaouez o lenn KAROLINA AR WERN tennet eus an hevelep niverenn.

Merket hon eus dija war VARR-HEOL ne vez ket sellet outañ p'en em gav e Ker-Vreiz, e Pariz, abalamour d'ar vrud en deus da vezañ ur gelaouenn gatolik, moarvat gant pennadoù relijiel displeget en ur c'hiz diamzeret.

... . Evel kelaouennoù katolik hag a gaver brezhoneg warno, hon eus hepken, en tu-hont da VARR-HEOL : Ar BLEUN-BRUG, ha c'hoazh ez eus muioc'h a c'halleg warnañ eget a vrezhoneg; hag e galleg emañ ar pennadoù pouezusañ - kement-se, na petra'ta, a sell ouzh ar renerien hag a zo mestr war o zachenn. Neuze emañ STUDI HAG OBER kelc'hgelaouenn warni pennadoù war an Doueoniezh, war al Liderezh , war Istor Relijiell Breizh, gant e stagadenn :

ar Bedenn evit ar Vro.

BARR-HEOL a zo disheñvel e spered hag e dachenn, diouzh spered ha tachenn an div gelaouenn-se. Evel STUDI HAG OBER ec'h anavez ur Yezh hepken : ar yezh peurunvan, daoust ma vez war e yezh blaz an Tregerieg, Gant ar spered broadel ez eo awenet BARR-HEOL, BLEUN-BRUG ne deo ket.

Setu perak en deus BARR-HEOL e labour da ober e Breizh.

Da gantañ marteze e-touez katoliked an Emsav, met ivez e-touez ar holl dud a-youl-vat hag a gav pennadoù liesseurt en e bajennoù. Pep tra avat, gant ur spered ledan hag ur spered o klotañ gant kefnadurezh an Iliz, En abeg da se ho eus gant plijadur digoret pajennoù BARR-HEOL da EMGLEV AN TIEGEZHIOU, ha ledanaet hon eus an dachenn gouestlet da vuhez an Tiegezh (kegin, rolloù-meuzioù !) evel m'hen diskouez studiaden hor c'henlabourez yaouank, Annaig Roue, war ar reolennañ ar ganedigezhioù.

Yezh BARR-HEOL n'eo ket ur yezh poblek ? Pelc'h emañ ar yezh poblek, en deiz a hiziv ? Ar brezhoneg-pobl a zo bev bepred, nemet e talc'h da baourat ha d'en em vrizhellat a c'herioù gallek. Forzh penaos ne vez mui skrivet ar yezh-se, daoust ma c'heller e gaut bepred amañ hag ahont, evel da skouer war GOUNIG AR GUINDI, kannadig-parrez Bulien- Kaouenneg-Lanvezeg. Daoust ma'z eo brezhoneg-pobl 100 dre 100, graet evit Tregeriz, ne vez ket skrivet hervez giz distagañ Bro-Dreger. Met se'zo un afer all. BARR-HEOL avat, ne ra ket gant yezh ur c'hornad-bro; silañ a ra evelkent en e skridoù gerioù ha troioù-lavar pobl an aliesañ ma c'hell, gerioù ha troioù-lavar dizanv a-wechoù d'hor gwellañ geriadurourien.

A-barzh ar fin en em gav ar c'helaouennoù brezhonek en un enkadenn : dreist-holl war dachenn ar c'heleier. O vezañ ne zeuont ket alies er-maez, ne c'hellont ket reiñ ur bern keleier, anat deoc'h. Gwashañ pezh a zo e vez aloubet tamm-ha-tamm tachennoù' zo gant kazetennoù gallek an Emsav : lakomp, l'AVENIR DE LA BRETAGNE, hag evel-se ne chom mui kalz a draoù nevez da embann e yezh Breizh, nemet lennegezh an hini a vefe. Skridvarnezh ? Sportoù ? C'hoariva ? Darvoudoù a bep seurt ?

Keleier eus ar Beg hag eus ar Broioù Keltiek ? Kaout a reot kement-se e galleg ar pezh a gerot !

Ne c'heller ket evelkent lezel an traoù da vont evel-se. Setu amañ soñj an hini fidelañ eus hor c'henlabouerien « Dav derec'hel d'al labour dibabet, diouzh an titl BARR-HEOL AR FEIZ HA BREIZH. Atav e vezo tra pe dra hag a vezo lavaret gant ar gelaouenn ha n'eo ket gant ar re all; ar sellboent ne vo ket kennebeut ar memes hini diwar-benn an hevelep traoù . . . Evit ar skrid-varnerezh e vefe tu da ledanaat an dremmwel ha komz diwar-benn levrioù a bep seurt ha pa ne vefe netra enno diwar-benn Breizh hag he c'hudennoù. Evel-se e vo pelaat / ar riskl da adlavarout traoù displeget dija gant ar c'helaouennoù breizhek all » . . .

Evit reiñ ur vuhez neve da VARR-HEOL, kreskiñ niver e lennerien, e roer an ali d'e embann aliesoc'h : bep miz. An dra-se a zo bet kinniget gant ar mouler e-unan, a gavfe aesoc'h, emezañ, sozañ un nebeut pajennoù ur wech ar miz eget 40 pe 50 pajenn bep tri miz. An ali-se a zo bet roet ivez gant KUZUL AR BREZHONEG, ha gant tud hag a zo kerse ganto, gant gwir abeg, o vezañ m'eo kouezhet AR BED KELTIEK, ken fidel da zonet er-maez bep miz !

Evit-se ez eo ret bezañ en ur greizenn vrezhonegerien c'hredus, kontant da labourat ha da gemerout pep hini e lod eus al labour. Eno emañ an dalc'h.

Kaer hon eus pediñ ar re yaouank da zont, e vez poan, mil boan o kaout o c'henlabour. Ha mil vad a rafe dezho koulskoude evit peuzeskiñ ar yezh. Moarvat ez eo talvoudus-bras plediñ gant kudennoù an Ekonomiezh hag ar Gevredigezh, met pa weler un Tregeriad 100 dre 100 o skrivañ wal LIAMM niv. 151, paj. 179 : *diouzh al lun, diouzh ar meurzh, diouzh ar merc'her*, e c'heller en em c'houlenn peseurt brezhoneg emeur o teskiñ de. Diouzh ar beure, ya ! Diouzh an noz, ya ! Met d'al lun, pe zokent Al Lun, Diouzh al lun ? ? ?

Eo a-wechoù, diouzh al lunvezh ma vezer, e ranker ober traoù disheñvel, hervez e vicher !

Zoken gant ar riskl da adlavarout traoù bet lavaret pe skrivet e lec'h all, e rank BARR-HEOL (koulz hag ar c'helaouennoù all !) kenderc'hel gant e labour, ne gav ket deoc'h ?

Ha BARR-HEOL gant e spered katolik !

KLERG.

BEBEKADOM

Bihan. Ront da kuilh. Melen ha roz. Heñvel-mik ouzh ar skeudenn an dedennas kement e-doug va bugaleaj.

Mont a raen d'ar skol abred diouzh ar beure. O tremen bemdez dre an hevelep straedoù bihan. Kamm, digamm. Toull, didoull. Leun a boulligoù dour pa gouezhe ar glav. Pebezh levenez o stardan prim an div votez koad kizellet brav hag, Houpig ! Houp ha e-barzh ! Dres e-kreiz. An dour o flistrañ a bep tu. O c'hlebiañ din va chaosonoù ruz tan. Bado am beze bep tro digant va mamm pa zistroen d'ar gêr da unnek eur. Ya' vat ! M'ho kwel ! ' Dalveze da netra dezhi gourdrourz . . . Bado pe dibado ! Pemdez c'houlouù ivez an hevelep staliouù a-hed va hent. Dirak ti an apotiker boñzeg e chomen a-sav. Bamet. Abaf. O sellout. Hag oc'h adsellout ouzh ar babig kadum. Dezhañ un tres ken yac'h, ken fresk, ken friant !

Dont a rae kemm gwech ar mare war skeudenoù a-dreñv gwerenn vras ar Boñzeg. Kaset e vije war wel neuze, o kemer lec'h ar babig koant, ha peurviañ e deroù an diskar-amzer, dremm ur paour kaezh den merzheriet skrijus. Euc'h e benn ur pikol morzhol tev. Ur graban bounner a seblante skeiñ, melloù taolioù, gant ar morzhol-se war ur gen lemm. Ha gwelout a raen . . . Santout a raen-me, ar genn euzhus, o treuzañ din va c'hlopenn, o tiskenn . . . o tiskenn . . . Hag o tiskenn atav donoc'h, poaniusoc'h. Digomprenus a-greun, avat, oa eviton diseblantiez dremm an den. Penaoz e c'helle e fas chom evel-se, sonn ha difiñv gant seurt genn bourevius a-dreuz d'ê dal ?

Gouzañv a ouien eno. Sichennet, evet da viken, war ar riblenn straed. Va fri stag ouzh ar werenn, pladet warni. Ur gwir marv bihan pemdeziek. N'am eus biskoazh abaoe gellet sellout lonkañ dirazon « *Les poudres de Koek* » nes skrijañ gant eñvor skeudenn paotr truezus ar genn !

Piv en hon touez-ni, yaouankizoù ar bloavezh 40 a savas dezhañ raktal e lesañv ? N'oufen mui lavarout hiziv ! Ne oa outañ nemet un ofiser yaouank flamm. Ur German muioc'h pe nebeutoc'h pa oa kement er vro ! Nemet . . . Nemet. Kerkent ha gwelet e zoare gaoleg lorc'hus . . . Kerkent ha merzhet e dres sot-nay, divergont, dismegañsus . . . Kerkent ha sellet pizh outañ o kerzhout balc'h, ur gelastrenn dindan ar gazel, en e doull lagad dehou ur werenn lundedenn siellet pervez . . . O . . . Adalek neuze sklaer ' oa d'an holl en dije kavet unan bennak ' vit sevel dezhañ e hanter devezh ! Melen. Ront ha kuilh. Roz ha glas. Ur gwir Babig kadam. Hep koantiri jentil ar skeudenn siwazh !

Kavout a raen dezhañ, me, neuz brabañser ur c'hogig Barbari kentoc'h.

Diot a-grenn : o vale, savet war e bigernoù. C'hoant ' michañs gantañ adpakout un hanter santimetrud uhelder ha pa ne vefe ken.

Kontet e veze a bep seurt diwar e goust. An teodoù o valañ avel . . . « Mab neme tañ d'ur jeneral « von un dra bennak » e vefe sañset . . . « Nann ! niz «prop» d'ar Goering tev » hervez lod all. Keit ha ma vezo digor va daoulagad, krediñ a ra din ne zisoñjin biken ar freuzh hag ar reuz a gouezhas warnom en abeg d'ar c'Hadomig !

1940 eta ! Kreiz miz Eost. Ur sul. Aloubet kêr abaoe c'hwec'h sizhun gant tri mil soudard alaman. Manerioù ha tiez brav an dro war dro, bontet gant ofiserien a bep seurt. Tri jeneral o ren warno evit prientiñ treuzadenn Mor Breizh davet Breizh-Veur. Un amzer gaer. Un hañvezh eus an dibab. Evel m'eo ral gwelout war hor bro.

Goude an oferenn-bred, holl yaouankizoù ar gêriadenn en em gave « war an hent nevez ». Pourmenadenn villiget ma oa anezhi. Dinoaz a-walc'h koulskoude ! Garmet warni gant nouspet rummad beleien eus laez ar gador brezeg ! Marvet int holl ar veleien-se . . . Dismantret ar c'hadorioù prezeg . . . « An hent nevez » zo deut da gozh. Chom a ra bepred kalon hag ene ar gêriadenn. Nemet, n'eus mui siwazh a dud yaouank laouen ha drant o kantren warnañ. Divroet int. Divroañ rankont holl evit gounit o bara. Tonkadur kriz ar Vretoned ! . . .

Mont ha dont a raemp. Eus « tal ar Groaz » da « benn ar pont ». Ar merc'hed fichet ha fardet. Saeoù skañv ha sklaer. Loeroù seiz lintrus. Togoù plouz ledan o tamgushat ar blev hir rodellet. Drevezet an doare d'o c'hriabañ war hini star amerikan brudet ar c'houlz : Rita Hayworth ! Ar baotred, int, aes-tre o dispartiañ hervez o gwiskamant.

An vartoloded garanet enno kantvedoù merdeadurezh vrezel, a zouge feal dilhad mezher glas mouk d'ar sul. Ur gasketenn war ar penn, ' hellit krediñ ' vel ar pik o peurechuiñ al lizherenn « I ». Ar baotred all, micherourien, implijidi, a heulie livioù ar mare. Cheuc'h tre oa dougen dilhad « pain brûlé » pe « bleu pétrole » !

Koulskoude ar gasketenn oa un arouez. Drezi e veze diforc'het martoloded Douarnenez « Roueed ar mor don » diouzh an Drebuliz. Ar re-mañ a zibabe dalc'hmat « visierenoù » ler du lufus da damm a-raok o c'hasketinier. Tra ma kavemp-ni seurt traoù mat hepken da c'holeiñ pennoù ar « Pemmalc'hiz sovajed ». Pe c'hoazh - ya, va Doue - o tereout klok ouzh pennoù plat « Trebuliz droc'h ».

War an hent nevez an holl re se, mesk-ha-mesk. A vandennoù bras. A lies a-sav o fistilhañ. Tolpet diouzhtu etre mignoned . . . Ur gwir fourgas.

Ouzhpenn, Allas ! ar soudarded estren, dizoloet ivez ganto « an dro war an hent nevez ». Kadomig en o zouez.

Holl vartoloded an daou borzh-mor' oa dilabour. Eoriet ha chadennet ar bigi er fesoù. Betek pegoulz ? Den ne ouie. Difennet groñs oa bet outo mont d'ar mor. Urzh german. Deomp da c'houzout, biken betek-hen ne oa bet klozet hent ar mor d'hon tud-ni, amañ. Traoù ken sebezus' oamp o vevañ, gwir eo !

Penaoz meizañ abeg seurt euzhennoù ? Dic'hallus a-greun deomp kompren. Oristaled. Prennañ hent o micher dirak pesketourien Vreizh !

Kroget o doa, amzer dezho degouezhout, dre gemer preder gant kement pandulenn e kêr. Kemmet deomp an eur, hep mui termal.

- « Ranker ket bezañ eus penn kentañ 'r sizhun memes tra'vit kas ac'hanomp d'hon gweleoù da nav eur noz ! » Unnek eur ganto, sañset. Dre ur seurt amzer gaer; hag hi deiz bras ganti c'hoazh . . . « Div eur a-raok goulou an heol ! F'oar de, 'vank ar pep gwellañ d'an dud paour-mañ ! « Ar biz-yod o skeñ prim war gorn an tal.

Reveulzet naet ar « pennoù-sardin » ! Ken kustumm da vevañ er-maez 'vel ma oamp. War hor straedoù noz-deiz, tud war vale. O vont . . . pe o tont. Pa lestre ar wazed ez aemp ni, ar maouezed, ne verne deomp an eur, da reiñ dezho un tammig « paskonnduit » betek ar porzh.

Ar friturioù pesked, niverus-tre hag hiziv klozet, a labourer hogos bemdez betek div, teir eur goude hanternoz. Klevet e veze « kliklak » botoù skañv botoù « kokot » merc'hed ar fritur - o tistreiñ d'o ziez. Hag evel un heklek, botoù-koad tachet ar vartoloded o krabisañ paveziou gleborek druz ar banelloù enk.

- « Evit an nozveilhañ, penaos 'vo graet hiziviken ? » Tu ebet da vezañ en noz er-maez ! Doujet bras 'oa, evel pep tra o tennañ d'ar marv, an nozveilhañ. Dreist-holl e familhoù tud ar mor. Allies, ken allies siwazh ! sammet rollet er pallennoù rust nemeto, an tarzhioù. Dezho, nag arched na lid an nozveilh. Tri ger hepken war ur bez er vered : « Kollet er mor ! ».

Setu kemmet ganto, ar soudarded gwer, an eur . . . Serret digor ar porzh. Eus Plomarc'h betek penn pellañ ar chaoser, ur chadennad hir a flojennoù houarn. Unan c'hoazh a-dal d'ar Porzh-Ru . . . O stouvañ aber porzh Treboul, unan all ouzhpenn. Ha ni klaouet ha klaouet brav ! Gwarded, o tougen fuzuilhoù ken bras hag int, savet dezho lochennoù, digor frank war ar chadennoù-harz. Maltouterien villiget ! « seurt traoù pec'hed koll ar ouenn outo ! » Ar re-mañ, avat, a gavemp farsus lenn ar skritelloù staget war o lochennoù : G.A.S.T. Ma ! « Iche ! Gwelet 'peus ? Soñjit petra ! » Al lizerennoù-se a lakae fent ennomp. Gisti maltouterien !

Koulskoude, daoust dezho bezañ alouberien, erruet warnomp a-raok m'hor bize komprenet na perak na penaos; daoust d'ar c'herse, d'an nec'hamant ne oa e-touez an dud na spont na gwir gasoni. N'eo deut houmañ d'en em ledañ nemet goude ma torras an Hitler diaoulek ar feur-emglev Russian-German ha ma tagas bro Stalin !

Ar merc'hed o flabotañ er poullou-kannañ. Un teod lip lardik, pec'hed da nikun mont en he mouezh, o ren war ar fistilh :

- « Ma ! Pa teu soñj din . . . Kement a draoù am eus me klevet. Kement' zo bet kontet warno an Alamanted-se, ken a grede din 'oant ket tud egistomp ! Padal, 'gavan ket anezho gwashoc'h na falloc'h 'vit ar re all ! »

Evit gwir, amzer' oa ret da zisouezhañ ha dont adarre ennomp hon-unañ. « Ar marichal nous voilà » en doa goulenet an arsav-brezel. « Ar jeneral me voici » a c'halve da gendec'hel ar brezel. Paotred an Enez-Sun, sanket dir enno gant ouzhpenn kant bennigdi-gezh o ferson a lamme fonnus er bagoù. Herr e-barzh, tudaj, davet Breizh-Veur ! Ganeomp amañ an urzh German o tiazezañ. Kartennet pep hini. Tikedoù boued. Tikedoù dilhad. Tikedoù bara ! Lañs d'ar marc'had kuzh. Hag ivez evel just d'an enebiezh. « Pa vank ar provizion e sav an disañsion ».

Keleier ? 'oa ket kalz mui. - « Kasit d'ar maerdi koment benveg skingomz . . . Urzh diwezhañ. Pakedet aketus hon hini. Unan kaer. Nevez-flamm, prenet gant Mam a-bonn daou viz a-raok. Neuze . . . Lakaet e-ser kalz reoù all da uhelaat ar bernioù e sal vras an ti-kêr. Bernioù, betek ar sol ! Ne chomas

ket pell eno, avat. Va zad o remorziñ . . .

Bezañ rediet da sentiñ. En ur seurt doare . . . Mont a rae dezhañ dre e wad douarnenezat.

- « Met, ni' zo gwir cheulked ! . . . Perak 'vefe ret deomp asantiñ ? Ar benveg-se 'zo din. Paet ganin. Emaon o vont diouzhtu davetañ . . . » Tizh tarzhenn war an den, Ha supresamis kuit ! Un hanter-eur goude, staliet en doa adarre an ardivink en e lec'h. Aketus kenañ, ar skouarn stag ouzh an uhelgomzer, Tad a selaoue « Ici Londres » c'hwec'h gwech 'n deiz da nebeutañ. E verc'h gantañ en e gichen, ret h en anvav !

Seizet buhez ar gêriadenn gant dilabour ar besketourien. Treiñ ha distreiñ ar pep brasañ a'n amzer eus ar chaoser betek an aod vihan. Gwir sturioù diahelet, hor paotred ! Koulskoude, abaoe daou pe dri devezh, un tammig diduamant : harpet a-hed spled houarn ar c'hae bras, evel en ur c'hoariva, sellout faeüs, goapaüs ouzh embregerezh al lu german. Deogadet evito kaerañ, modernañ, nevesañ bigi ar porzh. Pebezh rann-galon ! Ar c'hanodoù bihan a gorolle goustadik ha stañv, prest da dreizhañ ar soudarded. Allas ! Soudarded oant. Dianav a-grenn ar mor dezho. Kofadoù spouron ganto dirak stroñs dizehan ar bagoù. Nac'h a ouient a-wechoù diskenn er c'hanodoù. Er mintinvezh-se, morlivet, distronket gant ar spont, lod a glaskas tec'hout . . . Adpaket. Razhataet. Pilet d'an douar a daolioù skourjez, a daolioù troadoù fuzuilh, a daolioù heuzioù ofiser !

Kerkent, an hu. Eizh kant korzailhenn gourel o youc'hal, heuret. - « Hou . . . Hou . . . Hou . . . Hou . . . ! » Sonioù ar gounnar ruz o koeñvañ, o'n em ledañ, o strakal eus an eil kal d'egile e-giz ma tarzh ur barrad kurun. An ofisourien alaman sabatuet, tolpet raktal, a selaoue ar vlejadedenn skrijus. Klozet an embregerezh 'vit ar mare.

Antronoz oa ar sul. Sulyezh ar Bebekadom ! Er mone-done birvilhus, poket en dije - sañset - un taol ilin 'kreiz e gofig dour-laezh. Gwir pe faos ? Penaos gouzout e-mesk ur seurt pobl tud war an hent nevez ?

Harzet raktal un dek paotr yaouank e-touez ar re yaouankañ enokement hag ober ! Gronnet a-zoare gant soudarded alaman, Kadomig o vale rok ha daeüs dirazo etrezek « ar c'homandantur ». D'an ampoent ti-bank ar C'hef-Espenn nepell eus ar bourmenadenn.

- « Raust ! Raust ! Raust ! ». Ar sonioù dianav, rust ha garv a dre-gernas trumm o pulluc'hañ an aer glan. Kredet e vije klevout hir skourjezoù plomennet o strakañ a-us d'hor pennoù hag o frailhañ pep tra. Skodeget . . . Mantret . . . Spontet-mik ivez lod eus an dremenidi a bigne a-dizh hag a-dag war ar riblennoù strizh. Hag adarre ar « Raust ! » milliget a fuc'he spouronus.

Rak un urzh da heuliañ hor bize hiziviken. Ur riblen da vont : hini an tu dehou. Unan all evit an distro : war hon tu kleiz. Biskoazh tra ken lakis c'hoarvezet betek - hen er porzh - mañ !

Pa soñjer ! Lakaat ar boblañs disuj ha disensus-se da vale urzhiet dindan yev an nerzh estren ! Tra gwashoc'h : war riblennoù ar straed hepken. O bravet ! Paour kaezh Germaned « stummet » ken urzhiet : Int ! Bienierien ar sul da noz o dije gellet kontañ dezho nag a basiañtied, nag a sioulder spered e veze ret diskouez . . . Desket o doa gortoz . . . Digeriñ a rae dirazo koulskoude (met dre gaer) ur vanellig strizh-strizh gant, a bep kostez, ur voger vev gwaskus. Goustad. Goustad klask en em silañ . . . O teurel pled kouz war-raok ha war-gil ouzh ar c'hantadoù diversker ! Ret oa klevout ar merc'hed deut un tammig war an oad o c'hourdrouz ar bienier divergant a-walc'h a lakae dasoniñ ar c'horn :

- Ma ! sellit hamañ 'ta ! 'Michañs 'vimp ket lib da vale 'pelec'h

plij' deomp ! Hepdale memes ' vo deomp da bignat war ar riblennoù d'ober plas da gement termaji'zo tout war zigarez ' mañ staliet war e benn a-dreñv en un oto. Iche ! Aet d'ho pro, paour-kaezh papigo. Gant ar vezh ! Dont amañ d'ober al lezenn ! Met, sell piv ! »

Brudet ' oant, tud perzh bras Kernev. E meur a zoare. Mat ha fall evel just. Rebechet' veze dezho dreist-holl blivder o spered. Lemmder o zeod. Primder o imor. Met brudet-bras o brokusted, brokusted ur galon virvidik. Dre dreist pep tra o doujañs evit ar frankiz. Frankiz ! Ar menoz pennañ. Da vezañ gwarezet. E pep degouezh. E pep lec'h. War vor ha war zouar. Zoken war ar straedoù. Alouberien pe get.

Bremañ, penn-da-benn ag « an hent nevez » bet ken. Mut an holl. Enkrezet. Tevel a ra pep tra evel-se war ar maeziou a-raok tarzhadenn gantañ ar gurun ! Eo, koulskoude . . . Un trouz. Unan nemetken. Ken poanius o sevel. Hini heuzioù tachtet an Alamanted. O ya ! Bez e oamp ganti da vat ar wech-mañ ! « Dindan seulioù pounner an Estren ! » Sujet ha sujet a-zoare. Dre nerzh ar fuzuilhoù. O va Doue' ta ! Hep gellout netra. Netra. Na kriz !

Gant anjelus kreizteiz, a bep kroazhent soudarded all o tiflukañ . . . Adsav gward. Dirak kement lec'h kemeret ganto. An ti Post. Ar maerdi. Komandantur. Tiez o jeneraled. Burevioù ar maltouterez. Hag all . . .

Klevet oa bet evel just abaoe pell dija . . . Gwelet ivez. E filmoù kelaouet ar mare, o doare lidel da gerzhout ! An arvest ? Ganeomp amañ hiziviken koulskoude hag e kement hag e kement keriadenn eus kornog Europa.

Hor struj, frink leun o c'horf bepred, a seblante kemer dudi bras gant seurt sark bemdez. Sebe zus eo merzout nag a ijin a vez gant ar vugale. Na pegen spiswel ez int. Hag evit hor re-ni d'ar c'houlz-se na dispont e vezent ! « Ar ouenn a denn ». Deut oant holl barrek kenañ da jestraouiñ gant ar « Paz-gwaz » divalav daonet-se ! Redek a raent bep mintin, ganto bep a vzh war o skoaz, dre straedoù strizh karterioù ar porzh. Strobadoù anezho. Ar voused vihan, dienrollet diwar o listri, kerken ha ma klevant an « Ali, Ali, Alo » tregernus . . . A-ruilhoù eus kement toull teñval, eus kement trepas don, lañs warno oc'h huchal da heul ar bandennadoù, kreñvoc'h ma c'hellfent ! O lenn buhez karterioù ' zo eus kêr Dulenn, diwar bluenn Brendan Behan, adkavet em eus an hevelep seurt bugale dizaon ha ken dilu ! Ni, hor re a c'hoarie bezañ soudarded ; o trevezañ bemdez al lu german. O mintinvezhioù merc'hed va bro gant embregerezh beure al lu-mañ ! Pennaos kentañ seurt traoù ?

Da bemp eur bep mintin e sav an harao e pep lec'h. An deiz kentañ, dihunet ' kreiz o c'houk, o klevout garmadennoù war ar straedoù, an dud spontet a lammas diouzhtu d'ar prenistri, digor frank a-hed an noz gant ken tomm an hañvezh :

- « An tan ! An tan ! » a c'harme unan.

- « E pelec'h ? E pelec'h ? . . . »

- « E laez kêr e tle bezañ, un tu bennak ».

Padal ! Pa ziskomas al lu o kanañ (kaer-tre e ouient kanañ) tonioù bale. O neuze ! Ar paour kaezh « pennoù sardin » a chomas divouezh. Dinerzhed. Badaouellet mik. Koulskoude va c'hredit evit ma chomfe divouezh ur gwir penn sardin . . . A fei tudaj !

Ya, met antronoz . . . Pa grogas al lu da vale adarre ' benn neuze distagellet oa an teodoù ! O va Salver ! Un enskrivadur eus ar pezh am eus-me klevet neuze a dalvezfe e bouez aour e selaou hiziv !

- « O tud ar Werc'hez ! Sofijit ' maint e noazh-pilh war ar rmoù ; an hu ganto a-boan m'eo savet an deiz ! Iche ! Viltañsoù ! O redek gix tud tamm felc'h,

o lammat eus o nask ! War o ranig ; un disterig netra tout warno' vit kuzhat dezho o zammig peadra ! O Sant Tujeñ paour ! ' man fin ar bed o tont hep dale, n'eo ket posubl !

- N'emaint ket e noazh, arsa ! a eilgerie va zad. Bez ' z eus ganto kalsonoù bihan c'hwi ' wel mat ! »

Furoc'h ' vije bet da dad tevel sur.

- « Petra ? ' maoc'h ket dre ho kwad mat er mintin-mañ. Pe, e vefec'h o koll ho tamm spered ? Kalsonoù . . . Kalsonoù a rit-hu eus an tammouigoù kotoñs-se c'hwi bremañ d'ho tro ? (mare meur ar c'halsoneier hir euzhus oa neuze). O Santez Anna benniget ! Petra' ranker ket gwelout ha klevout en hor bro ! Ni ' zo tud kollet gant an dismegañsoù deut warnomp amañ eus foñs an archipi (*). Ma vefent brav c'hoazh ! Lod anezho vefe laret siñjed gwirion kement a vlev zo warno ! O donjerus ! Iche ! Fi oar de n'eo ket parmetet . . . Dihuniñ ac'hanomp mintinoc'h eget ar moc'h ! Ha ' vit gwelout petra ! »

Ne gredan ket e ouie penn sardin ebet da bet eur e save par pemoc'h ken dianav oa deomp-ni, tud ar mor, buhez ar maeziou. Met ne vern avat. Ur gwir reveulzi a c'houneze kalon mammoù ar merc'hed yaouank . . . Paotred yaouank e noazh-ran dre ar straedoù ! Un torfed ! Petra va Salver' oa pourmenadenn an hent nevez e-skoaz an dra-mañ ?

An nor o tigeriñ frank. An nor vuzhudas ! . . . Banniel ramzel milliget ar groaz kamm, hejet gant an avel-sil, a fiñvas evel da saludiñ an dud o tiskenn gant an diri greunvaen. Daou ofiser yaouank. Unan anezho « Bebekadom ». Adalek bremañ hor gwashañ enebour !

Beogadet hon eus. Ur vlejadenñ ken gouez, ken ne c'helle dont ganeomp nemet eus an amzerioù kent. Eus don-donañ ar ragistor !

« Kadomig » a vistroadas war ar bazan ziwezhañ. Chom a rae eno, difiñv, o teurel selloù diskredik war an engroez fuleret. Ne gomprenet ket penaos oamp errou holl eno. Pennaos en dije eñ, German, komprenet emzalc'h ur boblañs ken anarkour ha ni ?

Ar soudarded, diouzhtu, o doa gronnet klet tre an dirioù. Ur feiwebel a zisplege, son ha reutaet, ar pezh ' oa tremenet.

Sevel a reas Bebekadom an dorn dehou betek e doull lagad ; sankañ ' reas donoc'h ar werenn ennañ e-keit ma skoe, gant ar gelastrenn, taolioù sec'h war an heuzioù kaer lufus. Treiñ a reas trumm. Pignal adarre ar pazinier o stlakañ an nor vras war e lerc'h. Kerken e krogas a-nevez fuc'hadennoù ar « Raust » hag ar wech-mañ ' oa sirius an traoù. Ret skarzhañ prim. Dek munutenn goude ne oa mui nemet Germaned war ar straedoù. Skuizh divi, pep hini ac'hanomp a glaske goudor peoc'hus e di. Echu hor reveulzi !

Barnet hor paotred. Toullbac'bet tri miz. Unan evit bezañ tufet. Unan all roet un taol ilin. An eizh all ouzhpenn kiriek a c'hoaperezh, a c'hodiseresh' enep Bebekadom. Ya, Fei ! Foet !

Ne vo ket klok istor an tammig Aotrou-mañ, peogwir n'hon eus morse gouezet evel just da betra oa deut. Kaset eo bet kuit ac'han buan-tre goude an afer-se. Da belec'h ? Pennaos en deus echuet e vicher ofiser german ? O rea bagadoù soudarded da glask aloubiñ Breizh-Veur ? Boued d'ar pesked bras neuze ! War dachenn skarnilet Tobrouk da heul Rommel ha kanaouenn hiraezhus « Lili Marteen » ? Pe war gouelec'h skarnet Stalingrad e-touez miliadoù ha miliadoù

(*) Archipi. Ur vro bennak dianav d'an holl. N'am eus morse gouezet netra ouzhpenn a-zivout ar ger.

prizonidi von Paulus ?

Kement a yaouankiz he deus ranket aberzhiñ Europa ! Kement a wad skuilhet. Kement a dorfedoù hag a zrougiezh !

Bebekadom ar brabañser ! P'e vemoran hiziv, o skrivañ darvoudoù va c'heriadenn, atav e welan anezhañ gant ar werenn ziot-se sanket war al lagad glas sklaer !

War vdr, p'emañ an amzer o c'hlañ, redek a ra warnañ neuze, betek penn pellañ an dremmwel, ur grizadenn ec'hon. Gant plegoù bras. Roufennañ don. Ha dre ma sav an avel viz, pep tra o kemm a ziwar-dro.

Ganeomp ivez an temz-aer a gemme. Seul ma troe an eur hep distro hor paotred. Damvougañ ' raemp, hanter flastret, stardet par ma oamp war ar riblennoù. O sellout sebezet mik (' oamp ket' vit dont ennomp hon-unan arat an difenn da gerzhout' kreiz hor straed !) « rañs an aotronaj » o vale, sedhañ bremañ, en hon lec'h ni. O klevout iyez, tousmac'h ar seuliou-se o pilañ ' o oamp, tourni o krignañ sec'h an nervennoù ken stegnet. Trouz an nerzh mac'hon. O leuniañ an empennoù, betek ma n'e vefe mui klevet nemetañ bev-bouzañ war ar bed !

A-daol-kaer, hep gouzout ar rak nag ar perak, ' vel ma tizh an tizh dibenn ar vechenn stoub, sioul, didrouz met didermal, warnomp holl avel ' o werv an disentez vut o c'hwezhañ eus ar biz; avel griz an enebiezh o krabisañ ar speted; avel but ar gasoni o roufennañ don ar galon . . .

A vloc'h ! An holl war ar straed. Nes ur ger, nes ur guzuliadenmig, nes ur guzuliadennig, nes ur gomz. A-hed hirder « an hent nevez », kozh ha yaouank, paotred ha merc'hed, diskennet diwar ar riblennoù. Lanv aloubus. Reverzhi vras. Hor gwir deomp-ni enep an nerzh. Redadeg spourunus ha blejadennañ an Alamanted. Urzhioù garnet. Storlok skiltrus an armoù o kargañ. Disrann prim ar soudarded, o pignal, int d'o zro, war ar riblennoù.

Ar foularenn o'n'em ledañ gorrek. O leuniañ ar blasenn vras dirak ar c'homandantur. Ha, da c'houde, an hini vihan en-traoù dezhi. Evel m'en em led plaen, plaen, an takennoù eoul marlonket gant an traehz disec'h et.

Eno gedal . . . Gortoz distro hon tud yaouank. Betek pegoulz ? Den avat ne ouie. Kargidi kêr oa deredet, un aer gwall spontet war o dremm. Ar maer ha lod eus ar guzulierien. Ar c'homiser polis (ar polis vras' vel ma lavaremp neuze), an Ao. person, gantañ ar c'hure a rae war-dro ar « patro », hag all, hag all . . . An holl dre ma teuent oc'h antreal en ti-bank-Komandantur. Ni atav war-c'hed . . . Eus petra'ta ? Eus ar marv marteze, kenkas e kolffe ur soudard bennak pasianted hag un tam sioulder . . . Ne oamp c'hoazh, a drugarez Doue nemet e-kreiz miz Eost 1940 . . . Ur chañs !

Biskoazh goude, ganeomp amañ, ne'z eus bet klasket avat lakaat urzh war ar straedoù. Na reiñ da gompren da dud ken disuj, e vije tu dezho mont dre ur riblenn ha distreiñ a-hed eben. Nann, nann ! Lezet omp bet da vale mesk-ha-mesk hervez hor faltazi, Pell-mell-kötigell. Gounezet hor boa d'ar sul-se emgann « an hent nevez ». Hogen ar frankiz-se he doa koustet tri miz toull-bac'h da zek ac'hanomp. N'o deus bet medalenn ebet ha disoñjet eo bet sur mat lakaat o anvioù war roll ar Resistanted ! Re abred' oant !

F. K/ vendal
6 a viz Meurzh 1971

E. BARZIG

OSGOOD

Ne oa ket bet graet goap eus Osgood gant gouarnamant Napoleon III, peogwir e oa bet anvet da isprefed Lannuon da bemp bloaz warn-ugent ! Ret lavarout en doa graet studioù eus ar gwellañ en ul lise bras hag e oa aet goude da Skol-Veur Bariz war al Lezennoù dindan renerzh e eontr, Charlez Appleton a Waldingfield, unan eus brasañ gouzieien war ar Reizh Roman.

Eus pelec'h an diaoul, a lavrot-hu, e oa difluket an dud-se ? Ac'hanta ! an Appletoned a oa un noblañs kozh-kozh hag illur eus Bro-Skos. Pa varvas rouanez Bro-Saoz, Elesbed kozh, e derou ar settekvet kantved, en em gavas mab Mari Stuart, Jakez I-añ, war un dro, roue ar Skosiz hag ar Saozon. Met Jakez a oa un nebeudig a dra, aonik, techou-fall dezhañ, paotr e benn e-unan, daoust dezhañ da vezañ divarrek, atav e c'hign-c'hagn gant unan bennak, betek an deiz ma n'houllo ken e bobl dioutañ ha ma vo ret dezhañ sachañ e skasoù gantañ da Vro-C'hall. Protestanted Bro-Skos a oa marteze ar re a zisplije ar muiañ dezhañ ha d'ober o devoa gantañ, kement ha ken bihan ma voe gwelet darn anezho, ar Buritaned, o tiroañ da Amerika, en o zouez un Appleton. E ziskennidi a voe Amerikaned ' leizh an neud, kar-o-bro ha dispart, a anebas ouzh tailhoù direizh savet gant ar Saozon. Unan anezhe a voe toullbac'h et a-raok dont da vezañ « Pastor Jeneral arme Washington. Unan all, ur skrivagner anezhañ, a zifennas ar Vorianed gwerzhet evel sklaved. Un appleton a voe ivez Kannadour ar Stadoù-Unanet e Bro-Sveden, hag e vab a zeuas da Vro-C'hall da chom. Hennezh eo a voe tad da Osgood.

E dibenn 1859, da bemp bloaz warn-ugent eta, en em gave ar paotr yaouank isprefed e Lannuon, un tammig kêr didur mud ma oa unan : micherourien gant o labour, kenwerzhourien o c'hortoz o fratikoù, bagoù o tont gant al lanv pe o tistreiñ war-zu ar mor gant an dical. Kleier o son en liz-parrez pe el leandiou.

Bev-buhezek avat, e veze kêr d'ar yaou, deiz ar marc'had. Nag a gezeg e marchosioù an ostalerioù, ha nag a venajerien er straedoù ha war ar blasenn en-dro d'ar stalloù ! Rak pinvidikaet e oa an dud diwar ar maez; mont a rae an aferoù en-dro. E-kerz Foar-Yann, e miz Mezheven, e veze neuze leun-houch ar gêr vihan hag ur gouel e oa evit an holl. D'abardaez e veze klevet evel just, lonkerien-sistr o kanañ a-hed ar straedoù ur rimadell bennak :

*« Me ne zebrin ket hig fritet
Eus ur gastolodenn (2 wech)
Me ne zebrin ket hig fritet
Eus ur gastolodenn difoñset ».*

11

Setu ne oa avat, nemet ur sin a yec'hed, pep tra a yae war an tu mat er vro, hag an isprefed n'en doa ket kalz da soursial ouzh an dud.

P'en deveze kaset da vaer pep parrez urzhioù an Impalaer ha re ar prefed, ne vane ket kalz tra gantñ d'ober. Marteze ez an re vuan evelkent ! Degemer alies an noblañsoù, ar gargidi hag ar vourc'hizien en doa ivez d'ober ha bezañ degemeret gante goude. Ha zoken e oa ret dezhañ bezañ aketus d'henn ober, rak an Impalaer a felle dezhañ gwelout o skoulmañ darempredo gant holl bennoù-bras an têrour.

Pa vezer yaouank-flamm, ne skuizher ket gant gouelioù. Fidam ! Osgood ne rae sin da bediñ tud ha da reiñ dezhe da goaniañ. Bep merc'her dezhañ noz e veze karreozioù e-leizh en-dro d'an isprefeti, hag aotronez hag itronez. Pa p dilhad kaer o tiskenn anezhe. Ar c'hargiad yaouank a oa deuet da vezañ n'eo ket ladenn an holl. Ur paotr plijus-kenan e oa, e gwirionez, koant ha mistr, sporter ha desket-bras, seven hag hegarat e-keñver pep hini; ne oa ket da lavarout, e oa e vefe bet kavout un denjentil gwelloc'h fononet ha gant dorasoù dereatoc'h.

Ma tegemere an dud, en ivez eta a veze pedet aliès gant bonedoù. A bep seurt a oa anezhe. An noblañsoù gwechall da gentañ-tout, tud desket savet-mat, ar re-se a oa eus renk Osgood ha diouzh e c'hrad ivez. Kalz anezhañ o doa c'hoazh keuz d'ar roue, met dont a rafe a-benn anezhe tamm-ha-tamm dre forzh ober brav dezhe; en em glevout mat-tre a rae gante, ha plijout a rae dezhañ da goaniañ d'o c'hestell war ar maez.

En tu-hont d'an noblañs, en doa d'ober gant pevar pe bemp kenwerzher pinvidik eus hêrioù Lannuon ha Landreger. Ar re-se a oa kentoc'h republikaned a galon, met evel ma na raent nemet pinvidikaat, ne oant ket a-enep d'an Impalaer.

D'ober en doa c'hoazh tremen diouzh tri pe bevar bourc'hiz all a c'hiz nevez, deuet dour d'o milinoù, pe da hini o zud, gant ar Reveulzi, prenet gante evit mann madoù an Iliz ha re an aotronez harluet. Ar re-se a oa pell diouzh talvezout ar re gentañ - e spered Osgood da vihanañ ! - ha mont di a oa kouezhañ diwar ar billig en tan. Met bez' e oant a-grenn a-du gant gouarnamant kreñv an Impalaer, dre m'o doa aon da goll o feadra nevez dastumet pe skrapet. Ne vezent ket degemeret gant ar gastellourien, se'zo sklaer. Gante e veze ar muiañ a zistalac'h hag a diekoù, betek re :

« Ar c'hamm a sañh
Keit hag un all,
Hiroc'h, mar gall ! »

Aes e oa dezhe diakouez e oant pinvidik, ar peurrest avat, a oa diaesoc'h : kolo n'eo ket a-walc'h evit meñraat ar mesper, amzer a zo ez-homm ivez.

Ur dornad beleien ha tri c'hargiad uhel a oa ret d'an isprefed ober cher dezhe ivez. Unan eus an tri-mañ, an aotrou Bitter, resever a gentañ klas, genidik eus an Elzas, ne blije ket kalz dezhañ. Hemañ a oa ur c'hozh sac'h-c'hwezhañ a bemp bloaz ha daou-ugent bennak, bet ofiser, un tronkon den lart, ur gouzoug hag ur vouezh kole dezhañ, hag e gwirionez . . . ur c'hole pe gentoc'h ur gastouer touet e oa.

E dad a oa bet anvet da varon gant Napoleon gozh, hag a-du gant e

niz edo; aze avat, ne oa netra da lavarout, ha kouiskoude ez eo ar marc'h-antier - se a zisplije ar muiañ da Osgood.

Noblañsoù, bourc'hizien, holl e oant aketus da bediñ an isprefed yaouank, dre ma plije dezhe, met ivez dre ma oa dizimez, rak ne oa ket unan ha n'en defe ket ur verc'h en aod da fortunañ. Ur boked a oa en-dro da Osgood, petore bleunienn a germerfe ?

Lec'h ma veze an aliesañ eo er c'hestell diwar-dro, e Kerzuel e Pleuveur, Traoñgindi e Tonkedeg, Koadilio e Ploubêr, ha Kerewen en Bulien. Amañ avat ez ae diwar-bouez un neudenn vrein. Hep bezañ ur c'hastell meur, Kerewen a zo ul lojeiz dereat, met ar c'haerañ eo e gadoù guez uhel deru, kistin ha fuv dreist-holl.

Deut e oa an diskar-amzer ha ne oa ket posubl kavout er vro kalz haeroc'h eget alezioù hir an domani-se, pa zeued diur hent hent bras Gwengamp, evel eus kostez Rospez. Lavarout a rae an isprefed da Vatis, e baotr-karr, lahaat e gezeg da bilpazañ, hag un dudi e veze evitañ gwelout an delioù liesioù o tarnijal epel balafennoù-hañv ha klevout hiboud an avel er volz meurdezus.

Ar perc'henn, ar c'hont a Genec'hriou a oa eus koshañ noblañs Breizh ha gwad e gentadoù en doa ruilhet gwechall e Jeruzalem evit difenn Bez Hor Salver. En tu-hont da se, ur paotr jentiel ha didro e oa. Pa ne veze ket re ziwezhad anezhi, na re fall an amzer, e rae dibrañ daou varc'h dilikat hag e veze graet tro an domani. Deuet koulz koan, e kave Osgood ar pep gwellañ c'hoazh - hegarated ar gontez ha kenedusted he merc'h Anjela, beskontez Kerninon, ken koant ha ken kevrinus en he dilhad du, rak intañvez e oa ha hi bloaz warn-ugent hepken. Al letanant a Gerninon a oa bet lazhet e Majenta, d'an daou a viz Mezheven, en e vleuñv, goude bezañ bet dimezet un nebeut mizioù. Ne oa ket da lavarout, honnezh eo an hini a lakae kalon Osgood da lammat. O ! evel just, ret e vefe itemer amzer; re dost e oa maru he gwaz evit ober al lez dezhi, re sirtus e oa hi evit reiñ ton dezhañ diouzhtu, ha kouiskoude e oa aes gwelout ne chome ket diseblant; he daoulagad c lavare trugarez dezhañ hep gwech ma'z errue. Hag evit pezh a sell ouzh he zud, ne c'helle ket o degemer bezañ hegaratoc'h.

Ar goañv a zegas an nosvezhioù hir hag ar bodadegoù niverus evit an isprefed ha pennoù-bras ar vro. Bep eil deiz, dre vras, en em gave an holl dud-se en un ti pe egile. Daoust d'he c'hañv, marteze zoken abalamour dezhañ, e kase an Aotrou hag an Itron e Genec'hriou o merc'h d'an holl ouelioù-se, ha ne daent kuit nemet pa zeue mare an dansoù. A-benn neuze Osgood hag Anjela o deveze kavel amzer d'ober kaoz; na servije ket, ret e veze dezhe klennañ an eil gant egile. Kastellourien Vullien a oa evurus o welout o fennhêrez o sederaat, met kerent an dimezell-ed-da-zimez in a gouezhe muioù-h-mui o meud en o dorn, hag e oa ur rummad all hag a gave ivez trenk ur soubenn : ar baotred yaouank ! Ken koant e oa Anjela ha ken pinvidik. Met ne chome da farsal gant hini nemet gant an isprefed, ann holl c'hrasoù-mat a oa evitañ, mann ebet d'ober.

Met an hini a sell muiañ o-dreuz, n'ouzo c'h ket piv e oa ? Ac'hanta, 13 n'eo ket unan yaouank, met ar baron Bitter.

Biskoazh kement all ! An amprevan-se en defe plijet dezhañ lakaat ar bolez-se dindan e bav. Evel'ouzoc'h :

« Ar bleiz a ra gantañ poan
Gwelout dirazañ un oan ».

Treñ, distreñ ha troiata a rae en-dro dezhi gant ur bern tiekoù en ur glask toullañ kaoz, met ar vezkontez ne rae fed ebet dezhañ, ha ne gelhe ket kuzh he disfiz, he dispriz ha zoken he runkun. Krog e oa hemañ da gantañ gant ar fulor; ne oa ket kustum a-walc'h ar pezh Elzasian-se da welout e Bre-tonezed bihan » evel ma lavare oc'h ober fae warnañ. Meur a hini a oa dezhet dindan e ardoù.

Sellout a rae a-gron ouzh ar c'houlad o tivizout gant mouezh dezhoù tener; a-bell da gentañ, met tamm-ha-tamm e tostaas gant e gompagnun. Bourc'hizien distaolet muioc'h pe nebeutoc'h gant ar re all. Hag eñ begañ da vrabañsal gant e vouezh taru a-drek kein an eil pe egile eus an amourou. Komz a rae hep mezh, gant fouge ne lavaran ket, eus ar paour-kezh met e fed etre e skilfoù hag eus ar wazed diwadet gant e gleze pe e bistolenn, en da gentañ goapaus ouzh an daou gariad.

Anjela a rae sin da Osgood d'he heuilh d'ur c'houlign all eus ar c'hoñs; met ne servije ket, mont a rae al loened diseven war o lerc'h. An ispreded e chenche liv hag e vignoez a selle outañ gant daoulagad ankeniet.

Dont a reas miz Mae gant e amzer doueal. Ur verenn lipous a oa bet e maner Traoñgindi, ha goude ar pred e oa aet an aotronez hag an itronezed da zivizout el liorz treuzet gant ar Gindi.

Ur blijadur e oa gwelout eno ar stêr herrus o fistilhañ hag oc'h eonenniñ war ar vein.

A-benn neuze e oa aet Osgood og gant karreoù ar baron fallakr, ha kompren a rae e oa tremen poent dezhañ minellañ ar porc'hell. Aet e oa da bourmen gant e vignonez ha daou zenjentil yaouank war ar c'hleuz ledan, pe gentoc'h ar sav-douar a zo un hent-treuz dispar, gant e ziv renkennad gwez uhel, evit degouezhout nepell diouzh dismantroù Kastell-meur Tonkedeg . . . Bez'e oa toulladig savennoù-douar evel-se er vro. Goude hini Kastell Kernabad, e oa homañ an hini gareañ. Krog e oa ar pevar yaouank da dañva douter an aezhenn glouar, c'hwez flour ar bleunioù, grougous an turzhunelled en-dro d'an neizhioù koachet e glazur blizidik an delioù nevez, da vinc'hoarzhin o welout monedoneañ ponner ar c'hwiled-derv hag o klevout kriadeg skiltrus ar gwennelied.

Allaz ! souden e tifoupas Bitter e penn an alez ! Daou genseurt eus ar re washañ a oa gantañ, ha ruz hokennoù an tri babor gant al lapaj, rak kofoù dizere e oant an eil hag egile. Tripal ha c'hoarzhin a raent gwashoc'h eget biskoazh. En taol-mañ e oant war gont ar furlukined yaouank a vez roet kargioù uhel dezho, kac'herien gwasket ha n'ouzont netra ha n'int mat da vann . . . « Chezuz ! petra int barrek d'ober ? Kab d'ober seurt, pa lavaran deoc'h, geo minc'hoarzhin ouzh ar merc'hed gant o beg-laezh. Daoust ha krediñ a reont lavarout ez eo o revroù dezhe ? »

14 Ar c'homzoù flemmus-se a oa bet distaget gant Bitter, ar pezh diver-
gont, just a-drek kein Osgood. Hemañ a zeuas liv ar marv en e gerc'henn;

tennañ a reas ur vanegenn eus e c'hodell ha skouarnata a reas ganti joskenn ruz ar baron. Ar fallkr-mañ en doa tapet, lakeda, ar pezh a glaske . . .

« Hola'vat, Aotroù' n Ispreded, emezañ gant ur c'hoarzh diseven ha goapaus, aet oc'h pell ganti en taol-mañ'vat, met ar baron Bitter, baron e Veurted an Impalaer, n'eo ket den da c'houzañv kement all, ret e voe paeañ, paotrig, ha paeañ ker . . .

Un taol-kleze en ho pouzelloù pe un tenn en hoc'h empenn a vo roet deoc'h ? Gwelet hoc'h eus, va mignoned, emezañ d'an daou lakepod all. Ha teurveziañ a rec'h bezañ va zestroù ?

- O ya'vat, eme unan anezho. C'hwi, Aotroù Baron, eo an hini a zo bet dismegañset, ha deoc'h eo da zibab ar benveg.

- Se'zo sklaer, eme ar poezon. Gant un tenn-pistolenn, Aotroù'n Ispreded, ec'h echuo ho tammig buhez.

E-pad ar sizhunvezh ma voe an testoù o tivizout war ar munudoù, evel m'edo ar c'hiz, ec'h en em gustumas ar paotr yaouank diouzh ar pistolnier. Kent reiñ dezhañ e gentel gentañ, e klaskas an Aotroù Kenc'hriou aliañ anezhañ da gas an afer dirak an Impalaer a ziluzfe ar gudenn, met, siwazh : « Hola'vat, Aotroù Kont, gouzout a-walc'h a rit em eus gwad denjentil dindan va ivinoù ! »

Devezhioù spontus da dremen evit an neb a oar e vo troc'het prestik neudenn e uhhez, pe er c'hontrol, e vo ret dezhañ lazhañ ! Ne dalvez ket ar boan komz eus anken Osgood ha na gouske ket halz, se'zo sklaer. Nag e oa kriz e blanedenn ! a-benn daou viz, tri d'an hirañ-tout, e vefe bet euredet gant koantañ plac'h e arondisamant. Karout a rae anezhi gant e holl nerzh ha gouzout a rae pegement e oa karet ganti ivez. Ma tegouezhfe dezhañ mervel, nag a c'hlae'har adarre eviti ! Se ne c'helle ket bezañ. Ober a rafe e seizh gwellañ evit bezañ trec'h, na vefe nemet evit Anjela Kenc'hriou. En devezhioù-se e chomas serret e zor e zaoua dest a oa gwir vignoned dezhañ. Ober a rejont o gwellañ evit di-
duiñ anezhañ. Ar bennhérez a waske war he glac'har gwashañ ma c'helle; a-wechoù ne servije ket, sevel a rae an dour d'he daoulagad, met kalonek e voe ha neleze daeroù puilh da ruihal nemet en he c'hamb. Aze avat e teue he daoulagad da vezañ div feunteun re leun. Ya ! devezhioù kriz evit an daou yaouank hag evit kastellourien Gerewen.

Splannaat a reas Beurevezh an Tonkadur. Ur mintinvezh eus dibenn miz Mae . . . Ne oa c'hoah nemet peder eur; ur c'hlizhenn fresk a c'holoe geot ribienn an hent, dre zr c'hleuzioù hag o bleunioùigoù liesliv. Osgood a glaske o anvioù. Daoust hag-eñ ne oa ket ar wech kentañ dezhañ da deurel pled ouzh al louzaouennigoù-se ken koant ? Ar c'harreoz a grape goustadik-goustadik, evel en desped dezhañ, gant ar c'hruv sonn. Amzer a oa, e gwirionez, peogwir e vane tri c'hardeur evit ober un hanter-lev. Bremazon, Batist e-lec'h derc'hel war-zu Plistin, a rafe d'e loened treiñ a-gleiz en un hent kozh . . .

War ar bank a-dreñv eo azezet Osgood kaezh, ur struj warnañ, gwen-
noc'h c'hoazh dre m'eo du e livitenn, e dog seiz foñset uhel ha plat, hag e gra-
vatenn. Gwishamant eured pe goñv. Daou zenjentil yaouank a zo azezet dirazañ,
ken gwenn ha liñselioù int ivez, en o dilhad lidel.

15 ha ne leze daeroù puilh da ruihal nemet en he c'hamb. Aze avat e teue he

Osgood ne goll netra eus ar pezh a stag anezhañ c'hoazh ouzh ar vuhez . . . Nag a gigi, ma Doue, war ar maez ! Perak n'en devoa ket selaouet aliesoc'h o zrompilh ken nerzhus ha ken taer ? Kousket e veze c'hoazh goude bezañ tremenet al lodenn vrasañ eus an noz o klakenniñ : se'oa e ticher.

Di fluket mat e oa an heol bremañ a-us d'ur voradenn dame'hias gant dantelezh alaoueret hag deuzas buan. O sellout dre werenn a-dreñv e garreoz, e welas neuze ar paotr yaouank fraezh ha sklaer, dindan ar bannoù lugernus, skoaz uhel Koad Kerewen hag e teuas dour war e zaoulagad : du-hont edo e vuiañ-karet hag he zud o pediñ evitañ . . . Adober a reas gant Anjela ur gudennad graet gante en alez vras dindan bolz veurdezus ar gwez uhel leun a gan . . . Krougous flour ur c'houblad koulmed a zegusas da soñ dezhañ eus o baleadenn war savenn 'Draoñgindi, met ivez eus Bitter, hag a gridien a waskas e galon. Ya, diouzh un tu, an diaoul dichadennet-se gant marv e beg e venveg ha diouzh an tu all ar vuhez taolennet gant an heol ber-niget o lakaat al laboused da ganañ ken laouen dre ma kreske . . . Un tad-makalc'h a c'huitellas gant tiriled moulc'hi all mesket gant ur bern mouezhioù dianavez. Ur gazez-koad a c'hoarzas . . .

« Hatch ! » Rodoù ar c'harreoz a wigouras hag a ruilhas neuze sioul war c'heot un hent-glas ledan teñvalaet gant bernioù gwez a bep tu.

« Oooh ! » Gwetur egile a oa aet pelloc'h hag Osgood a voe kontant da chom hep tostaat outañ . . . Ar pevar dest a saludas hag a yeas davet an eil hag egile. An Isprefed a welas unan eus pep rumm o vuzuliañ an dachenn a gammeoù hir en ur niveriñ adalek unan betek tregont.

An amprevan a oa du-hont er penn all, kroaziet e zivrec'h war e vruched ledan hag ur minc'hoarzh yen war e vuzelloù . . . D'an ampoent e klevas Osgood paour brizilhonoù sklintin ul loen-kezeg'drekañ; tostaat a reas ur weturig hag anavezout a reas an doktor Foll, e vedisin . . . Ar paotr yaouank a dapas neuze en e c'hodell ur groaz vihan aour bet kinniget dezhañ gant Anjela hag a bokas dezhi.

Unan eus pep koublad-testoù a oa distroet davet an eil hag egile gant pep a voest. Karget e voe ar pistolnier ha roet pep a hini d'an daou emgannour. Evel en un huñvre ec'h intentas Osgood unan eus an daou zenjentil o rannañ ar gerioù-mañ : « Aotrou ! n'Isprefed, setu ar pezh o deus asantet dimp an daou zenjentil dimp an daou all a-benn ar fin : ne vo ket buket . . . Klevet hoc'h eus : pep hini ac'hanoc'h a zle tennañ ur wech hepken bep bizañ. Setu ma'z oc'h eta ken barrek hag egile. Savit bremañ ho penveg a-sonn a-us d'ho penn. Pa glevot tri, e tiskennot ho pistolenn hag e tennot Kerkent ».

Unan eus keneiled ar baron a huchas a-bouez-penn ha diche
- Prest oc'h, Aotronez ?
- Ya, a respontas raktal hag a-gevret an daou emgannour.
- Unan . . . daou . . . tri ! »

Evel taolioù-skourjez e strakas an tennoù kriz e soulder ar beure ken kaer.

Ha petra a c'hoarvezas ? Ac'hanta ! Bitter, ar paotr glorius, hag en doa kontet dre-holl ne oa ket par dezhañ gant ar bistolenn, Bitter, pa lavaran, a c'huitas lip e enebour, met e dog-efñ a oa bet tanfoeltret war ar c'hlazenn. Fuloret ar sac'h-c'hwez, emichañs, met gwazh-a-se evitañ, echu e oa an duvell !

Ha koulskoude n'en doa ket lavaret gaou, rak un tenner ampart e oa evit gwir. N'en devoa ket bet amzer c'hoazh an isprefed da fiñval, pa welas e vignoned un taol-treitouriezh spontus : un eil pistolenn garget e voe roet prim-ha-prim d'ar baron gant e genseurted; bukañ a reas, tennañ hag e kouezhas Osgood war an douar. N'en devoa ezhomm ebet eus an Aotrou Foll : rak marv-moust e oa.

Kentañ a reas ar re a oa testoù gant an den kaezh en ur zistreiñ da Lannuon e voe mont d'an archerdi. Nec'het ar brigadier, evel just. Re uhel en-karg e oa ar baron evit lakaat harz warnañ. Pedet e voe hepken da chom en e di . . . Hag an daou zenjentil neuze da Gastell Kerewen . . . Anjela a yeas diouzhtu er bord all : intañvezet evit an eil gwech, koulz lavarout. Hep koll amzer e c'halvas ar c'hont unan eus e vevelien : « Da Roaz-hon ez eomp, mab, dibr da varc'h ha va Moji. » O vont da welout tud Osgood edo.

Ne dalvez ket ar boan kontañ deoc'h e kasas an tad kaezh ar muntrer dirak al lez-varn. Rak evit an holl ne oa Bitter nemet ur muntrer, un diaoul evit lavarout ar wirionez, ha diaes reiñ un anv all dezhañ. Nemet e rankan lavarout c'hoazh deoc'h e teuas a-benn war ar marc'had da sachañ e reur gantañ ! Penaos ?

Aze avat ez on chomet berr. Evel ma oa bet diskaret e dog daoust d'ar paotr yaouank da vezañ diakuit da dennañ, e c'helle ar baron reiñ da soñjel d'ar varnerien en devoa buket ha torret an emglev etre an testoù . . . Pezh ne oa ket gwir. Ar respont avat, am eus bet digant ur mignon : « D'ar c'houlz-se, emezañ, e oa ar reolenn akuitañ akuitañ bewed er seurt aferioù ! ». Didamallet e voe Bitter ha ne voe ket cheñchet plas dezhañ zoken. Met echu e oa d'e vrud er vro, nep lec'h koulz lavarout, ne voe pedet ken. Eo ! pedet da chom er gêr. E vrud fall ne chomas ket e trowardroioù Lannuon, ha daoust dezhañ da vezañ gwerzhed e vezh peil a oa, e komprenas evelkent e oa ret dezhañ sachan e sachoù gantañ. Da belec'h ? Den ne ouie . . .

Ha koulskoude ne glozin ket va danevell diouzhtu. Ar mignon mat hag en deus dibunet din buhez Osgood a zo ur gourniz dezhañ. Ha setu petra en deus kontet din ouzhpenn :

« Hanter kant vloaz bennak goude afer Osgood, e voe anvet va zad da varner yaouank da Lannuon. En deiz ma voe kadoriet e teuas ur bern tud da selaou e brezegenn ha d'ober anaoudegezh gantañ. Er penn a-raok e oa azezet ur vouez kozh, un itron a renk uhel diouzh gwelout anezhi, ha ne lamme lagad ebet diwarnañ. Echu pep tra, edo ma zad o klozañ e sae-varner

hag e baperoù pa zeuas an itron gozh davetañ da c'houlenñ bezañ selaouet
na pa ve daou vunud : O, emezi, nag ez oc'h heñvel outañ !
Nag ez oc'h heñvel ouzh hoc'h eontr an Aotroù Appleton. Me eo ar veshkontez
a Gerninon !

N'he doa het gallet ankouaat Osgood ha chomet e oa dizimez.
Sampar e oa daoust d'hec'h oad hag e oa he dremm bepred eus ar plijusañ,
ya koant-eston e oa chomet Anjela.

Ha setu ar pezh en deus lavaret din c'hoazh va migon evit ezhañ :
- Ret-ma eo din bremañ kontañ deoc'h ar pezh a zo c'hoarvezet ganin,
ganin-me. Bet on evel ma ouzoc'h, meur a vloavezh en Amerika. Un noblañzh
e oan aet d'ar c'hoariva. Edon o klask va flas pa welis merket war ur gador-
vrec'h an anu-mañ : Aotroù Ritter . . .

Prestik goude voen azezet, nepell alese, e welis un den a ventañ
ha gwisket furo, o lakaat e galite er gador-vrec'h. Goulenn a ris digant ar
neñ amerikan a oa ganin piv e oa : Ma feiz, emezañ, hennezh, mar plij a
ur baron, ur c'henvroad deoc'h, pe . . . da vihanañ, e dad an hini a oa a-
eus du-hont . . . »

Ernest BARZIG.

Goude-Skrid.

Un istor gwirion ez eo, nemet ez eo bet lakaet da dremen e Bro-Lannuon
hag adkempennet gant an oberour. Osgood Appleton a oa ispreded e departa mant
ar Vezuen (Mayenne) a-raok ar brezel 70 hag an Aotroù Ritter a oa ar baron
Ritter.



E. TROAL

Sant Erwan

Gant harp Doue, gouzout disentiñ ha kaout kalon d'hen ober . . .

Krediñ a ran lavarout ez eo Erwan Helouri, Gandhi, Marzhin-Luter King,
Helder Camara tud eus an hevelep troc'h. Ha m'en defe bevet person Louaneg, hiziv-an-
deiz, doareoù ha komzoù eskob Recife a vefe bet gantañ. Ya, an hevelep danvez a zo enno
holl, rak tud int hag a oar disentiñ.

E miz Ebrel, edo Helder Camara, e Bro-Holland, hag eno ez eus bet graet
gantañ ur brederiadenn sklerijennus war drouklazh ar pastor King. Bez e c'hellomp, hiziv,
degemerout ar gelennadurezh-se, evel pa darzhfe eus kreiz kalon ar Brezhon a reas ennañ
berzh, en un doare ken dispar, gras an Aotroù Doue.

« Ar relijionoù - en o zouez, an hini gristen - a zo bepred e riskl da reiñ re
a harp d'un urzh kevredigezhel ha d'ar vestroni. Hogen an urzh-se a zo un dizurzh, pa'z
eus tud maget mat diwar goust tud maget fall, tud, an aour ganto war ar raden, pa'z eus
milieroù ha milionoù en diouer eus ar raden zoken ».

Hag e klevan Erwan o lavarout dimp : « Tennañ a rit ho mad eus an urzh hag
ar vestroni a zo o ren, bremañ. Penaos e tornatit ho tanvez hag ho peadra ? Ha bez'ez eo
atva gant ar soñj emañoc'h e lodenn binvidik ar bed ? ». Erwan eo Fransez a Asiz Breizh,
laouen eveltañ, truilhek eveltañ, prest eveltañ da rentañ al lousañ servij.

« Un tammig re o deus pouezet ar relijionoù war ar vertuzioù gouzafvus,
da lavarout eo, re e vez allet an dud da chom sioul, da blegañ o c'hein, d'en em ober hag
evel-se, ar frammoù-mac'homañ a chom divrall ».

Hag e sellan ouzh Erwan Helouri, o tarc'hel penn d'ar re-binvidik, d'ar re a
oa ganto ar galloud, ar vestroni hag al lezenn. Oc'h en em sevel ouzh Roue Bro-C'hall,
Felepe ar Bel, a felle dezhañ skrapañ telzercioù iliz-veur Landreger, e 1296. Frammoù-
gwaskañ a zo war hor broad, ha frammoù-gwaskañ a zo war ar Bed. Zoken, hep ober
gant ar feulster, ez eus tu da zrailhañ ar sternioù-se.

« Hor relijionoù, en ur gelenn dimp harpañ an den, daoust ha ne zegasont ket
da soñj deomp ez eo skoazell ar skoazelloù sikour an den da vezañ sonn war e droid, da
ober gant e vouezh, e benn hag e galon ». Ha gwelout a ran Erwan, o servijñ pep den, ha
pa vefe truilhoù war e gain ha laoù en e roched, evel ma vefe graet war-dro un aotrou.
Ha selaou a ran Erwan o tiskleriañ dimp : « Brezhoned, n'emañoc'h ket en ho sav, mougat
eo ho mouezh, seizet eo deoc'h ho penn, disec'het eo ho kalon . . . »

« Hor relijionoù hon ali re da vezañ war evezh, da vezañ fur, poellek . . .
Ar muzul atav ! Prezeget e vez bezañ klouar. E Amerika an Hanternoz, e c'hortozet ar
reizhder., abaoe pevar gantved hanter. En Afrika hag en Azia, e c'heder abaoe milieroù
a vloavezhioù. Ha dont a reomp da vezañ kablas, gant ar re all, eus direizhderioù skrijus ».

Erwan, eñ, a labour evit netra. Digor-frank eo e di hag e wele da n'eus forzh
piv. Treut, kentoc'h treutik, eo e geusteurann. En em zizober a ra eus dilhad cheudh e
garg a varner. Person eo e Tredrez hag e Louaneg, ne rae ket diouer enno an til hag
pri. Erwan, derc'hel d'e renk ? Ne ra ket foutre-kaer ! Derc'hel d'ar muzul ? Ne c'heller
ket, rak Jezuz Krist, e Vreur hag e Aotrou, n'en deus anavezet nemet ur muzul, an
a ya « betek ar penn pellañ ».

Ha perak ne lavarfe ket dimp, hiziv, an Erwan-se, « droch » evel m'eo d'ar
kement sant ha kement haroz : « Breizh a zo o c'hortoz abaoe ouzhpenn pevar gantved . . .
Hag e c'hortozit atav . . . Ha ne gavit ket fur, poellek, tud « renket », ar re ne « c'hortozit
ket mui ». « Peur ' ta e viot difur, divuzul, diboell dirak planedenn ho Pro, dirak ker
tra a vrein ar Vro-se eus an diavaez hag eus an diabarzh ? »

« Lavaret e veze da Luter King e oa lezennoù hag eo ret sentiñ ouzh al lezennoù
abalamour ma'z int lezennoù. Kaer eo avat, ar gentel roet dimp gant an diouganer du
« Kement lezenn a ro harp d'en den da sevel a zo reizh; kement lezenn hag a vac'hagn,
a ziskar an den, a zo direizh. Ha degas a rae King da soñj ez eus bet merzherien a vil-vern,
e-doug pevar gantved kentañ ar Gristeniezh - da lavarout eo - e oa tud, hag o deus disentez
ouzh lezennoù direizh. Met gant an amzer o vont en-dro, ar Relijionoù o deus en em ziazezet
brav, o deus kavet blaz gant ar vrud, ar veli, hag o deus ankounac'haet hent ar gwad, hent
an testeni poanuis ».

Den-a-lezenn e oa Erwan Helouri, ha morse n'en deus pleget d'ul lezenn direizh.
Hag e klevan anezhñ o lavarout deomp :
- Sellit pizh ouzho ho Proad hag ouzh ar Bed, ha gwelit a-dost an urzhioù, ar gourc'hemenoù
taolet war ho Pobl ha war dud an Douar. Ret eo deskiñ lavarout Nann ! gant ho taouarn
noazh ».

« Rebechet ez eus bet da Varzhin-Luter King, eñ ha na oa ket genidik eus
Birmingham, emellout e kudennoù-diabarzh ar gêr-se hag ar relijion a oa hec'h hini. King
avat, a oa evel ar brofeded : int-i boazet da bellaat diouzh o c'hêrioù evit embann
- Evel-hen e komz an Doue Peurbadel . . . » Tennañ a rae da Baol o vont huit Tarsoz
e-lec'h m'edo o chomp, evit embann ar C'heloù-Mat, betek ar penn-pellañ eus ar bed
gresjan-roman . . . Pelec'h ' ta emañ, hiziv ar c'hudennoù ha n'o deus ket a liammoù gant
an diavaez ? Pelec'h ' ta emañ ar c'hudennoù ha n'o deus ket ment an hollved ganto ».

Ma neuze, eme Sant Erwan, komprenit mat ez eo ho tonkadur, ho planedenn
stag ouzh tonkadur, ouzh planedenn kement poblad ha kement broad mouget, dismantret,
arallekaer, a zo war an douar. Ententit mat hoc'h eus ivez da lakaat ar bi z war al lin-brein
o tont eus a-beil.

Dinec'h em eus lakaet person Louaneg da dreiñ evidomp, da gempenn evidomp
ar c'homzoù bev diwanet eus kalon domm an eskob brazilian. Ha soñj hor bo, ma'z omp
heulierien ar Christ-Jezuz, ma'z omp saverien disub an douar, ma'z omp izili ur bobl
diwanet diwar youl an Doue Bev, soñj hor bo n'eo ket mat tamm ebet chom re habask,
re evezhiek, o sellout re a griez hag a-zehoù, o vont goustad, atav na re, na re nebeut.

Soñj hor bo ez eo dav alies lavarout Nann ! gant daouarn noazh.

Soñj hor bo ez eo ret koll amzer, lakaat hon ljin da vont en-dro, en em aberzhiñ,
lakaat hor faltazi da huñvreal kaer, en ur reiñ an dorn d'an toulladigoù tud hag a glask
eveldomp lakaat an huñvreoù da zont da wir. Helder Camara a zo atav anv gantañ eus
bihanniveroù (Ar bihanniveroù abrahamek) .

Soñj hor bo ivez, ne bader ket er strourm-se gant kalonoù goullo. Gouzout
a reomp petra a garge kalonoù Gandhi, Marzhin-Luter King., peseurt tan a zev e kalon
Helder Camara, petra leunie kalon Sant Erwan « laouen e zremm, seder e ene », a lavare
an dud, rak leun e oa gant Spered an Tad hag ar Mab.

Gouel Sant Erwan, 19 a viz Mae 1972.

E. TROAL

Keginerezh

ALUMENN an ARVOR

Grit un alumeñ evel boas.
Kent plegañ anezhi lakait en he c'hreiz, pe meskl poazhet en a-raok pe ghevetez aozet gant holen, pebr, tin, ognoñetez, ul loaiaid bleud patatez pe vleuz gwiniñ pe c'hoazh istr bet tremenet ur vunutenn dre an dour betvet.
Lakait war ur plad gant hilienn graet gant kebell-touseg, dour an istr hag ognon poazhet en amann.

KIG-EJEN giz ELSAS

Kemer un tamm kig ejen er vrched. Lakait anezhañ en ur gastolodenn ha goloit a zour. Lakait ivez, ognon, persilh, lore ha tin; holen, pebr, kigen.

Berviñ ervat betek ma koazho an dour. Neuze lezel ar c'hig da boazhañ goustadik.

Da goulz ar pred, tennit ar c'hig hag astennit an hilienn gant dour klouar. Tommañ er goketenn. N'eus ezhomm ebet eus amann na druzoni all.

SALADEN AMERIKAN

Graet e vez ar saladenn souezhus-se evel-hen :

1 pikol letuz

2 bikol aval Kanada

3 banapezenn

1/2 aval-orañjez pe un 1/2 grap-fruit (pamplemousse)

troc'het a-dammoù bihan

Temzit gant hilienn « mañonez »

Hervez eo mat-tre.

Mat da c'houzout : tisan persilh a zo mat evit ar rem hag ar boan izili :
20 g persilh fresk evit ul litrad dour.

Planchoded eo ho ti ? Garanou ledan a zo etre ar c'hoad dijuntet ?
Ha mont a ra ar pouler er garanou. Neuze drailhit tammoù paper kelaouenn (pas B-H), glebit anezhe betek ober un doare yod. Meskit gant un tamm peg ha kargit ar garanou gantañ.

Soaz an TIEG.

Rolloù-meuzioù

(Korn an Tiegezh)

Evezhiadenn.

En ur embann amañ war Varr-Heol rolloù-meuzioù e fell dimp rentiñ servij d'ar re o devez c'hoant da aozañ e yezh ar vro rolloù-meuzioù evit degouezhioù a bep seurt. Fellout a ra dimp ivez sikour krouiñ troioù-lavar resis hervez skiant ar c'hegianañ. O vezañ ma plij da galz rolloù-meuzioù rimet e lakaomp amañ war-lerc'h daou roll-meuzioù disheñvel o doare.

1

Soubenn voulouzek
Morlouan bras
Teod-ejen
Rost-leuc
Fav Glas ha Gwenn
Saladen
Riz Mamm-Gozh
Gwestell
Frouezh

2

Evit ar begoù milzin
Ur banne dour diwar rezin
Soubenn an tri zraig
Dour, holen, ha baraig
Morzhed-houc'h gant meskailhez
D'ho lakaat blouc'h pad ur sizhunvezh
Kent, hag a-raok dec'h
E kave da beuriñ e pep lec'h
Marv eo Yann al Leue
Met kalz a hêred en deus
Piz bihan ha blot
Ha n'int ket evit al logod
Da loened-korn
Gwell vit un askorn
Madigoù ha lod
A bep seurt mod
Frouez alaouret
Da zegas sec'hed
Dour avaloù,
Gwin broadel (gwenn ha du)
Ha gwin birvidik
Netra ne bij din-me
Vel ur banne-kafe
Hag ur chigodenn
Da Yann Lip-e-werenn.

Digor-kaloa
Gwin Bro-an-Naoned
Torgenoù ar Rôa
Gwin Bourdel
Gwin birvidik
Kafe
Likorioù

Ev da win pur, da soubenn tomm
Ha pep hini, diouzh da ezhomm
Friko da sul, friko da lua
Ha bara sec'h pad ar sizhun

Keleier Emglev an Tiegezhioù

KELEIER ENGLEV AN TIEGEZHIOU
30 Plasenn al Lisoù
35 ROAZHON

« EN HOR YAOUANKIZ EO BET FIZIET GANT DOUE AMZER DA ZONT HOR BRO »
Y. N. PERROT.

Mae 1972

Niverenn 12

KIMIAD BERR (1)
d'HOR CHENEIL

Armañs ar C'HALVEZ

Marvet war an dachenn e kreis ar stourmadeg eo aet diouzhimp Armañs
Ar C'Halvez, gwir veleg ha gwir Vrezhon.

Prezegenoù, pennadoù-skrid, studadennoù a zo bet hag a vo da ziskouez
d'ar Vrezhonek ha d'ar pobloù all pegenn talvoudus eo, da gement den reizh, an ervennoù
bet digoret gant hor c'heneil. Gantañ eo bet hadet e kalonoù ar Vrezhonek ar sturiennou
a boaniomp ni ivez da lakaat bev ennomp hag en Hor Bro :

Adalek he niverenn gentañ eo bet embannet « Hon Tiegezh evel stagadenn
da « WANIG HA WENIG » A-drugarez d'an Aotrou Beleg A. Ar C'halvez, Doue d'e bardono !

KLOD DA ZOUE ha DOUJANS DA VREIZH
« EMGLEV AN TIEGEZHIOU ».

(1) Kimiad gwall verr . . . Rak pajennadoù e-leizh a vefe re verr da zisplegañ buñeziad
stourm pemdeziek Armañs Ar C'Halvez.

DEVEZH - EMGAV DISKAR - AMZER 1971

Kouviat e oa bet tud ha mignoned Emglev an Tiegezhioù d'en em gavout e
Roazhon d'ar sul 26 a viz gwengolo.

An devezh a grogas gant an oferenn e chapel vras Skolaj Sant Varzhin (er
chapel-se a vez oferennet bep sul e Brezhoneg). Da c'houde e voe merennet a-gevret en
ur sal gimiezh eus ar skolaj. Evel just ne oa bet lezet danvez dañjerus ebet ha bugel ebet
ne voe pistriet !

Da ziv eur rik en em gave ur c'harr-boutin dirak ar skolaj hag an tregont den
bennak a oa ouzht taol a bignas ennañ ha yao etrezek tachenn emgann Sant Albin an Hilliber.
Div pe deir gwech e chomas a-sav ar c'harr da zastum tud war an hent.

Tud all a oa aet war-eeun gant o c'hirri hag a-benn ar fin en em gavas ouzhpenn
hanter-kant den war dachenn an emgann. Kaer-dreist an amzer : sklerijenn, peoc'h ha
tommdar.

24

Pedet e voe a-gevret evit ar re a varvas el lec'h-se d'an 28 a viz gouere 1488
ha rentet enor d'ar re a roas o buhez eno da zifenn gwirioù hor Bro. Un tamm kaozeadenn
war an dachenn diwar-benn darvoudoù 1488 ha da c'houde c'hoarioù war al lanne.

Erru fin an devezh, e tistroas an dud da Roazhon gant ar c'harr-boutin a oa
bet feurmet. Un arsav kent antreal e kër da bediñ asamblez en Iliz Sant Gregor' lec'h
ma voe person gwechall ar Santig du.

POENT EO KAVOUT UR SEKRETOUR (EZ) YAOUANKOC'H
SONJIT EN AMZER DA ZONT EMGLEV AN TIEGEZHIOU !

Skouerennoù timbroù « LUN FASK » embannet gant « Emglev An Tiegezhioù »
da skoazellañ TIEGEZHIOU IWERZHON 6 - Karnedadoù 15 timbr - 10 lur -

Skrivañ : E.A.T. 30 Plasenn al Lisoù - ROAZHON - 35
(tresadennoù gant R. BERTHELIER)

DA BETRA ' VAT AN DEVEZHIOU EMGAV ?

Loc'hañ abred, lonkañ kilometroù, distrein diwezhat d'ar gêr. Dispign ur
bilhed tren pe litradoù tireoul.

Daoust ha kement-se eo hepken devezhioù emgav E.A.T. ? Gwelloc'h e vefe
paouez neuze.

Ma talc'h an Emglev gant ar seurt devezhioù eo dre ma tegasont dezhañ buhez :
pedenn asamblez, darempredoù ha diduamant etre bugale o vrezhonegañ, kennerzh evit
ar gerent hag evit ar re a intent ouzh Brezhoneg ar vugale, anaoudegezh gant tud nevez.
An devezhioù-se a zo ivez ul lodenn eus buhez Breizh breizhek, « Huñvreoù o tont da
wir » . . .

Anez d'an devezhioù-se e teufe prim E.A.T. da vrzhuniñ ha da vezañ hepken
un emglev dre lizher.

HA BUHEZ AR C'HREIZENNOU ?

Perak'ta n'eus nemet nebeut a geleier diwar-benn buhez ar c'hreizennoù ?
Marteze dre ma ne vez ket kaset kalz heloù. Hag ivez dre ma n'eus nemet un tiegezh e
Kreizennoù ' zo gant mignoned en dro dezhañ. Ha buhez bep tiegezh a zo lod eus buhez
E.A.T. Ha ne vo ket kaset ur rentañ kont bewech ma vez graet skol vrezhonek er gêr !

Nag a hini ivez a labour, n'eo ket hepken en Emglev, hogen e strolladoù-all,
war dachenn ar politikerezh, ar stourm sevenadurel, ar genskoazell, an oferennou
brezhonek ! En un doare e tegasont ganto kenlabour E.A.T.

GALV EMGLEV AN TIEGEZHIOU D'AN 20 - 4 - 72
DA SIKOUR AR VRETONED NEVEZ TOULLBAC'HET
HAG O RE

KENEILED HA KENVROIZ

25

Setu adarre Brezhoned diframmet diouzh o ziegezhioù, diouzh o michezioù.

diouzh ar vuhez wirion, da vezañ bac'het pell diouzh ar Vro.

Lakaat o nerzh da c'hounit muioc'h a frankiz d'o c'henvroiz : setu an doareoù ober hag ar pal lakaet ganto d'o'stourm. Ne felle kent dezho « Gortoz » . . .

Bugale, priedoù ha kerent dezho er gêr, kouezhet war o chouk sammoù bras ha diaesterioù kriz. Diaesterioù hor c'henvroiz e rankomp bezañ kenlod enno.

Da gement-hini ac'hanomp da zegas e lodenn, bras pe vihan, bremañ diouzhtu, ha goude en un doare reizh-amzer da :

SKOAZLL VREIZH

A RA WAR DRO AN TIEGEZHIOU LAKAET NEC'HET HAG ANKENIET GANT BACHIDIGEZH O ZUD.

BENNOZH DOUE DEOCH - HOLL HA TRUGAREZ !

Alan Al LOUARN

« SKOAZELL VREIZH »

B.N.P. - Champ Jacquet - 35 - ROAZHON - KONT NIVERENN 038.985

PE : C.C.P. ROAZHON 202 22 (Skrivañ war gein ar chekenn : Evit SKOAZLL VREIZH Kont 038.985 er B.N.P.)

« *Wanig ha Wenig* » a vevo ! Gant asant kuzul ar Brezhoneg eo bet kemeret e karg gant an Ao. Troal. Bennozh Doue dezhañ !

Skoazell da Diegezhioù
Iwerzhon an Hanter-Noz

Kaset ez eus bet 2.546,35 lur gant E.A.T. d'ar C'hevre keltiek ha dilhajoù d'ar S.P.I.

Embannet ez eus bet Timbroù - Skoazell gant E.A.T.

C.C.P. Ar C'hevre Keltiek : Ao. J. DEROUET 32 - 64 - 47 NOANED

Emvo Meur ar C.L.E.R.

Ur pennad a zo bet a-zivout ar C.L.E.R. e follenn ziwezhañ « HON TIEGEZH »
Ar strollad kristen-se a sikour ar priedoù en o buhez. An Emvod Meur a vo e Poissy eus an 2 d'an 9 a viz gouere. Mat e ve da dud E.A.T. kemer perzh.
Skrivañ : It. H. ROY 2 fue Ch. Peggy ALE'NÇON - 61

A. ROUE

Krommen ar gwreziou hag ar c'hrouiñ bugale

E kement ha ma vo tu ec'h embarno BARR-HEOL, pennadoù-studi diwar-benn buhez an tiegezh, hag ispisial diwar-benn ar reolennañ ar ganedigezhioù, evel ar pennad moulet war niverenn 71 eus BARR-HEOL. Diwar c'houlenn lennerien 'zo avat, e reomp da gentañ un nebeut diskleriadurioù diwar-benn ar gerioù implijet.

Krommen ar Gwreziou (pe mar kirit, *Kromell ar gwreziou*) eo al linenn sav-diskenn ha kamm-digamm o tiskouez war un diaolennig, gwrez, pe dommder ar c'horf. Evel ma ouzer emañ gwrez korf un den yac'h war-dro 37o derez a-us d'an o-gwan (zero). Kemeret e vez an tommer-se pe ar wrez-se gant sikour ur gwrezverker (ar bobl a ra peur-vuiañ gant ar ger « termometr »).

Reolennañ (*reoliañ*) ar **Ganedigezhioù** a zo klask krouiñ buhez, kaout bugale, pa vez c'hoant hepken da lavarout eo mestroniañ hag urzhañ an darempredoù etre ar priedoù en doare da zibab ar mareoù gwellañ da grouiñ buhez hag ar mareoù n'eus riskl ebet da ober. Pep tra graet hervez an onestiz kristen, evel just, ha kelemadurezh an Iliz.

Kelc'hiad ar Vaouez. Sujet ez eo pep plac'h deuet d'hec'h oad d'un darvoud naturel hag a vez graet anezhañ, hervez ar Geriadurioù : mizioù, bleuñv, amzerioù, merkoù, pe un anv kalc' sklaeroc'h « diwad miziek » dre ma tiskouez petra eo an darvoud naturel-se. E-touez ar bobl avat, eur techet mui-ouzh-mui da ober gant ur ger heñvellet ouzh ar galleg : *reglmanchoù*, deuet er yezh moarvat dre levezon ar vedesined. Graet e vez eus an darvoud naturel-se : *Kelc'hiad ar Vaouez*, met tu a vefe marteze da implijañ gerioù all evel « *troiad* » *kelc'hdroidad* ». O vezañ ne deo ket bet meret nemeur an danvez-se e brezhoneg, n'eo ket dimp-ni lavarout pehini eo ar ger retisat ha gwellañ. A-bouez-mas ez eo gouzout peseurt eizhoù eus ar miz en em gav an darvoud-se a-benn reolennañ ar ganedigezhioù, evel ma welimp bremañ.

Mammennoù-Vierez. Aozet ez eo korf ar vaouez an doare da furchañ bep miz ar pezh a arver ovulenn (: vi), hag an ovulenn frouezhusset eo a zo ar penn-kentañ eus buhez pep den. Krouet e vez an ovulenn-se er mammennoù, pe evit ober gant ur ger all : ar vierez; ar viañ pe an ovuladur a vez graet a gement-se. Eus an detz kentañ betek ar 14 vet detz eus ar c'hele'hiad e sav ouzh ar mammennoù evel ur sac'hig bihan e-lec'h na kresk tamm ha tamm an ovulenn beuzet en un dourenn ispisial.


Er sac'hig bihan-se (ar vedesined a lavar « *folikulenn* ») e vez krouet un hormonenn anvet « *folikulenn* ». Pa vez daret an ovulenn e tarzh ar sac'hig hag e lez an ovulenn da ziskenn; ar pezh a van eus ar folikulenn a zeu da vezañ melen ha setu perak e vez graet ar « *c'horf melen* » anezhañ. Ar c'horf melen-se a strilh d'e dro un hormonenn nevez : « *al luteinenn* » (diwar al latin *Luteum* : melen) .
27

an ovulenn e talc'h ar c'horf melen da greskiñ ha da strilhañ luteinenn; a-hend-all e teu tamm ha tamm da zispenn en ur lezenn ur greizhennig : ar c'horf gwenn, ha kerkent ec'h adkrog ur c'helc'hiad nevez.

B

Al Luteinenn a vez kavet had-ha-hed ar vrazeded, hi eo a laka ur vaouez difrouezh, a vir outi da grouiñ buhez. Mar ne c'hell ket ur vaouez e-kelt ha ma vez dougeret kaout ur bugel all ez eo abalamour d'al luteinenn-se. Met homañ a laka ar wrez da uhelaat un tammig, hag e weler kement-se diwar grommenn ar gwreziou : e-pad ar mare ma'z eo ar wrez en hec'h uhelañ e chom ar vaouez difrouezh. Setu amañ eta penaos en em gemerer. Adalek an deiz kentañ eus ar « mizioù » diouztu a-raok sevel, d'ar c'helc'hiad ar-beure, e kemerer gwrez ar c'horf e-pad 3 munutenn. Er penn kentañ eus ar c'helc'hiad : gwrez izel. (gwelout an dresadenn).

E-kreiz ar c'helc'hiad : gwrez izeloc'h c'hoazh (d'ar mare-se eo e c'hoarvez ar « viañ » pe an « ovuladur »). Ha neuze, evel ma verk an dresadenn e weler ar c'horf sevel : ar c'horf melen gant e luteinenn eo a zo penkaoz da gement-se, evel m'empomp o paouez lavarout.



Evit pezh a sell ouzh al lodenn gentañ eus ar c'helc'hiad, n'eo ket sklaer an traoù; n'eo ket sur-sur ar vedesined.

El lodenn-greiz eus ar c'helc'hiad eo e vezer er stad da grouiñ buhez nevez. Setu perak, evit pezh a sell ouzh ar priedoù o devez poan o kaout bugale ez eo ar maread-se an hini gwellañ ha surañ da gaout bugale.

Mar ne vez darempredoù etre ar priedoù nemet e-pad al lodenn diwezhañ eus ar c'helc'hiad, n'eus tu ebet da gaout ur babig. Koulskoude ez eo dav gortoz 3 devezh goude m'eo krog ar wrez da sevel, evit bezañ sur n'eus abeg all ebet d'ar wrez da sevel, evel, lakomp, un devezh-skuizhder hag a c'hellfe lakaat ar wrez da uhelaat. Merkomp ivez penaos ne vez tu ebet da faziañ, mar degouezh gant ar vaouez tapout anouedadur (grip) pe ur c'hleved bennak all, rak brasoc'h ez eo an diforc'h etre lodennoù ar c'helc'hiad : ar grip, da skouer, a ro allès 380 hag ouzhpenn.

Doareoù ressoc'h diwar-benn an ober gant krommenn ar gwreziou evit sikour ar priedoù en o darempredoù, a vo roet en niverenn da-zont eus BARR-HEOL.

M'hoc'h eus tra pe dra da c'houlenn a-hen-all, skrivit da :
Annaig RENAULT-ROY, 2 Ru. Ch. Peguy Appt 51, ALENÇON.

Anjela DUVAL

Paourkaezh plouk

- Ret mat eo din modemaat
Eme Yann.
Ret mat din prenañ mekanikou
- Ha mont d'an Amprest
Evel-just !
Ha skeiñ e-barzh goude
Noz-deiz-sul-ouel
War va zout. Hardizh !
(Evit paeañ milionoù dle)

- Yann baour !
Lez'ta ar mekanikou-se er stal
Kred ac'hanon
Biken paotr-kaezh na savi da chouk !
Da venvioù modern
Vo aet d'ar c'hozh-hernaj
N'az po ket c'hoazh echu d'o faeañ

- Pren kentoc'h un tamm kreion, sell !
(Tri az po evit triwec'h gwenneg)
Paper avat a gavi a-stlabez
Forzh pelec'h. Forzh pegement,
Hag aze da skrivañ.
Kred ac'hanon
Divrevoc'h vo dit kalz . . .
Ya' ta skriv, skriv
Forzh petra. Forzh penaos
Kaout a ri kliented d'o lenn !
. . . D, ne c'hou nezi ket muioc'h
Eget gant da vekanikou
Met n'az po ket da samm a zle.

Ha gounit a ri brud
Paotr-kaezh. Chésus !
Barrek out en-eeun da c'hounit
Un delwenn benn goude da varv.

Pe zoken en da vev.
Gant da greion, ha da lerbaj.
Da greion a c'hwec'h gwenneg !

Gant da vekanikoù modern
Petra c'hounezfes ?
- Korfadoù gwallreuz.
Gwarizi un darn.
Goaperezh un darn all.
Avi ur rummad :
Touristed kêr :
O ! emezo, ar paizant
Ne ra mui netra
Nemet pourmen,
War e draktor ! -
... Hañ ? Sede aze tud
Hag a wel sklaer !
Hañ ya ... war baper !

Pa lavaran dit.
Paizant va Breur,
Tap da greion ha skriv.
Dizale te vo un den-meur. An holl
An holl ouzh da veuliñ.
Met gortoz ... selaou va ali
E traoñ da skrid laka sa sin
Mar kerez. Met diwall.
Diwall mat, paotr paour
Da lakat da chomlec'h
Pe da di vo dizale ul lec'h
Gwashoc'h eget un ifern ...

(3 - 4 - 1972)
A. DUVAL.

LIVAJ ha GWISPON

Rakridig

X Mae 1972

Aotrou Rener

... Daoust petra a soñjot diwar-benn ar pennadig a gasan deoc'h ?
Mar hen kavit diouzh ho toare e vefe stad ennon ouzh hen gwelout war
VARR-HEOL ...

Va gourc'hemennoù ivez evit ho lizher da Brefed Sant-Brieg goude
jestr mezhus « Jañ-Mari Kiskoflek » deiz Obidoù an Aotrou Kalvez (Doue
d'e bardono !).

Respont : N'eo ket fall ho pennad ha ne welan tra ebet a gement a c'hellfe
bezañ abeged ennañ.
KLERG.

E-touez an traoù hag a ziskouez emañ ar galleg o lañsañ war ar
brezhoneg emañ, d'am meno, an anvioù nevez-krouet da envel tud parrezioù
Breizh-Izel : anvioù oc'h echuiñ en ien, ois, ais, in. Gwir eo, ez eus darn anezho
hag o zo kozh, dreist-holl ar re o verkañ tud ar c'hêrioù : Brestoï, Lorientais,
Carhaisiens, Briochins etc ... Met lennit ar c'hazetennoù hag o welot bernioù
gerioù ha na oa ket anezho n'eus ket 20 vloaz c'hoazh !

Diaes ez eo stourm a-enep d'ar c'hiz nevez-se, peogwir e vez komzet
kement diwar-benn kement parrez'zo tout, evit an digarez-mañ-digarez :
gouelioù, pardonioù, kermesoù, bodadegoù, sindikadoù hag all, hag all, hag
an hini a vez o komz pe o skrivañ diwar o fenn a gav aezet haout un anv resis
bennak.

Met n'eo ket diwar-benn kement-se e fell din komz dreist-holl.
Diwar-benn ar skritelloù a weler bremañ e beg an holl hentoù-parrez da
verkañ da belec'h e kas an hentoù-se. Un dra aezet, rak evel-se e weler diouzhtu
peseurt hent da gemer pa vezer o klask ur gêriadenn bennak. Met perak ez
eo troet skritur an holl skritelloù-se diouzh tu ar bourk ?

Rak evel-se, mar deuit eus ur barrez all, ne welit nemet kein ar
skritelloù hag e rankit gorrekaat evit teurel ur sell war ar skritell, da vezañ
sur e pelec'h en em gavit. Ret e vefe lakaat div skritell e beg pep hent-parrez,
pe da vihanañ skrivañ anvioù ar c'hêriadennoù war an daou du, ne gav ket
deoc'h ?

Bez'ez eus un dra all avat, hag a zo ouzh va nec'hiñ. Evel ma oar an holl, ez eus bet goulennet e bodadegoù Kuzulioù-Meur departamantoù Penn-ar-Bed, Ar Morbihan, hag Aodoù-an-Hanternoz, mirout d'an anvioù-lec'h o gwir stumm brezhonek ha diwall d'o zreiñ e galleg zoken. Ma ! n'eo ket stank-stank ar parrezioù hag o deus selaouet an alioù-se.

Dre ma kresk ar skritelloù-se (ha war greskiñ ez eont a zeiz da zeiz) e weler a-walc'h pegen mac'hagnet e vez an anvioù brezhonek paour, ha gwashoc'h c'hoazh, e weler darn anezho troet e galleg ! Ar Gér-Nevez : La Villeneuve. Ar Wern : Le Launay, ar Genkiz : Le Plessis hag all.

Evit darn eus an anvioù-se ez eus un hengoun kozh a-walc'h deuet alies dre berzh an notered. Met ne vern, an anv kentañ roet d'ar geriadenn-mañ-kêriadenn a oa hep mar brezhonek, hag ar brezhonek eo a biao an anv. N'eo ket d'an Aotrou Maer, na d'an Aotronez Kuzulierien, na zoken d'an notered eo da gomandiñ war se. Dleet eo dezho koulz ha d'ar re all, respetiñ an anvioù-se.

Daou stumm a welan da stourm ouzh ar c'hiz daonet-se da c'hal-lekaat anvioù-kêriadennoù.

Sevel ur strolladig-tud da skrivañ d'ar Vaered ha d'ar Guzulierien da ginnig kenlabourat ganto da reiñ ur gwir stumm brezhonek d'an anvioù-se. Hennezh eo ar stumm gwellañ, an hini deretañ ha peoc'husañ. Ha c'hoazh ez eo labourus muioc'h eget na soñj da galz, rak kudennoù a bep seurt a savo pe vo kistion da skrivañ anvioù`zo !

An eil stumm avat, n'eo ket ken peoc'hus ! Ha setu va soñj-me . . .

Sebezet e choman pa welan pegement a sloganioù a vez livet war ar mogerioù, war an tiez, war an hentoù. Difennet ez eo, sañset, hervez al lezenn. Met graet e vez memes tra ! Mont a ra a dra sur, podadoù ha podadoù-livaj d'ober al labour-se ha ret eo bezañ akuit evit aozañ lizherennoù stummel-brav. Ha n'eo ket evit netra ! Dispignoù a vez da heul. Hag e ranker hastañ buan evit diwall da vezañ gwelet ha tapet. Ne vern, n'eo ket livaj na gwisponioù eo a van, war e seblant !

Kavet ez eus bet avat, un tu aesoc'h ha fonnusoc'h (ha koustusoc'h ivez !) da livañ enskrivadurioù : bombezennoù ! O n'eo ket bombezennoù da darzhañ tiez ! Nann ! Bombezennoù-livañ ! Gwaskañ war lost ar vombezennad hag e flistrit livaj, hag e verkit hoc'h enskrivadurioù aes ha buan. Nemet n'eo ket eus ar marc'hamatañ !

Setu eta ar pezh a vefe da ober da gentañ : disverkañ gant un taol-gwispon pe ur flistradenn bennak gant ur vombezenn, an holl droidigezhioù gallek. N'ho po ket amzer, da c'hortoz ma vefe sec'h ho kwiskad-livaj, da adverkañ an anv e brezhonek mat ! Re a amzer a yafe ganeoc'h ivez. An taol-se a raio d'an dud en em soñjal ; a raio d'an Aotrou Maer en em soñjal. Dreist-holl mar lezit ur baperennig war ho lerc'h o tiskleriañ perak hoc'h eus graet kement-se.

Evit an anvioù skrivet fall avat, ez eo diaesoc'h reiñ un ali bennak, nemet e vefent skrivet en un doare lu pe diskiant.

Ar pezh a zo ez eo talvoudus ez eo reiñ da intent d'ar re a zo e penn ar parrezioù, ne dint ket barrekoc'h eget ar peurrest eus ar werin war ar skrivañ brezhonek pa n'o deus biskoazh desket hiroc'h war ar poent-se eget ar peurrest eus ar werin.

Neuze avat, e vo ret eta sevel komandoioù hag en em gargo eus al labour-se ? Moarvat ! Nemet e kredan reiñ un ali bennak : arabat e vefe gallegerien er c'homandoioù-se. Ne blij ket d'ar bobl gwelout tud ha ne dint ket brezhonegerien o'n em soursial eus traoù evel-se.

Met ret eo derc'hel soñj, evel ma lavare ar re gozh, ez aer pelloc'h gant un tog en e zorn eget gant ur vazh.

Ha kent gwir all ar c'hrennlavar-mañ :

N'eus sant ebet ha na glev
Pa vez sachet war e grev !

Grit eta ar pezh a zo en ho kalloud evit diwall ha difenn an anvioù bet dibabet gant ijin ha kizidigezh hon hendadoù. Roit d'ho ti hoc'h-unan un anv brezhonek-rih.

Ober a-hen-all a vefe pec'hed . . .

X.

Kerzhadegoù GALV

KERZHADEGOU GALV : Hini Lannuon 30 a viz EBREL.

Ar strollad GALV en deus graet meur a wech baleadegoù-brudañ. Ober a reont KERZHADEGOU eus ar baleadegoù-se a ro tu d'ar re yaouank studierien al lodenn vrasañ anezho, da ober bruderezh evit ar Yezh hag ar Sevenadur Breizhek. D'an 30 a viz Ebrel 1972 ez eus bet ur seurt Kerzhadeg e kornad Lannuon : Lannuon, Ploubêr, Tonkedeg, Kawan, Bulien ha Lannuon. Un devezh penn-da-benn pe dost, adalek 9 eur pe 9 eur hanter diouzh ar mintin, betek 6 eur bennak diouzh an noz. Aozet mat e oa bet an traoù : bruderezh war ar c'hazetennoù, skritelloù divyezhek peget ouzh ar mogerioù, ha neuze traktoù (5.000 anezho) da reiñ d'an dud dre ma kejent gant tud ar GEZZHADEG. An traktoù a oa bet liesskrivet ha war an tu e oa galleg ha war an tu all brezhoneg. Setu amañ ar brezhoneg.

PERAK AR BREZHONEG

« Dreist-holl dalc'hit soñj, Aotrouien, emaoe'h amañ evit lazhañ ar brezhoneg, ha netra ken ». Setu pezh en deus lavaret un ispreded d'ar vistri-skol.

Perak e fell d'ar gouarnamant DISTRUJAN yezh ha kultur Breizh ? PERAK a fell dezhañ KUZHAT ouzh ar Vretoned piv int ? PERAK e lavar eo paour hor bro, an desped d'ar wirionez, pa'z eo gouest da reiñ labour d'he bugale ? RET EO OBER gant Breizh un douar evit an douristed hag an arme (da skouer Park An Arvorig tachenn atomek an Enez Hir h.a.). Evel ma rae gwechall an Aljerianed hag ar Senegaliz, ar Vretoned na zeskont' met istor o gwaserieren, istor Bro-C'hall.

PERAK ?

EVIT MA VO AEZETOC'H KAS KUIT AL LABOURERIEIEN EUS O BRO evit servijout gwelloc'h c'hoazh soñjoù MANSHOLT, VEDEL, h.a.;

AC'HANTA ! ne fell ket dimp asantiñ da gement-se ! NAC'HAN A REOMP KUITAAT HON BRO ! Arabat disoñjal :
- a zo ouzhpenn 500.000 a dud o komz BREZHONEG bemdez er gêr, war an tachennoù-labour, er parkeier, en uzinoù, er porzhioù-mor.
- niver ar re yaouank o teskiñ BREZHONEG a gresk bep bloaz. Daoust pegen diaes e vez dont d'ar c'hentelioù-se, e teu ouzhpenn 6.000 a dud da heuliañ anezho.

DAOUST HA JUST EO LEZEL AR RE YAOUANK HEP GOUZOUT O YEZH, a vefe ken talvoudus koulskoude evit digeriñ o speredoù war gement tra a zo, hag ispisial war gultur o bro.

GALV A C'HOULENN START :

- 1 - ma vo desket BREZHONEG er skolioù, e kement derez a zo d'ar re o deus c'hoant, ha ma vo savet ul lisañs war ar BREZHONEG.
- 2 - ma vo kelennet kultur BREIZH d'an holl skoldi.
- 3 - ma vo roet ur plas dereat d'ar BREZHONEG er radio, en tele hag er vuhen voutin.

Setu perak emañ GALV oc'h aozañ - d'an 30 A VIZ EBREL - ur GERZHADEG a loc'ho eus LANNUON da 9 eur evit dont endro da LANNUON d'an abardaez.

DEUT GANIMP ! A-DU GANT GALV !

Deut d'an noz goude ar gerzhadeg, FEST NOZ e Lannuon.

X Ar straedoù strizh a-walc'h a zistone gant ar sloganioù. Unan e brezhoneg e veze distaget tre gant ur bouez-mouezh gallek : « Ar Brezhoneg er Skol », ar pezh a ziskoueze e oa bernioù gallegerien e-touez ar gerzherien.

Hogen an hini a dregerme ar gwellañ e oa an hini gallek : « Bretagne, Colonie » (Breizh, Trevadenn !) Ha kement-se a oa ur merk anat ez eo politikaet hiviziken kudenn ar Yezh ha kudenn gant Breizh, ez eo abalamour ma n'eus galloud na beli ebet etre Breizh ha Gouarnamant Paris, gouest da gomz en anv Pobl ar Vretoned, da lavarout eo, dre ma'z eo deuet Breizh da vezañ un drevadenn sunet ha disunet gant ur vro estren.

Ur vro dibennet ez eo Breizh ha ne c'hello bleuniañ an traoù enni a-nevez, nemet p'he devo ur c'horf politikel o komz en hec'h anv hag o tifenn mad hag interest ar Vretoned. Un diskoulm hepken evit pezh a sell ouzh ar Yezh, ar Sevenadur, an Ekonomiezh : ur Penn Politikel d'ar Vro. Stag-ha-stag emañ pep tra.

Mont a reas ar gerzherien d'en em zastum dirak an Ti-Post hag o vezañ ma oa bannieloù Gwenn-ha-Du ganto e voent istribilhet ouzh ar prenestroù. Ha pa gomzan eus Bannieloù . . . e voet graet e Lannuon, en noz-se un taol hag a voe klasket tamall da baotred yaouank GALV : un dousennad vat a zrapoioù triliv a voe tapet ha devet, pe zrailhet. Mont a reas ar polis, en deizioù war-lerc'h, d'al lise da c'houleñ digant ar Provizor roll ar re a heulie kentelioù brezhonek, gant an esper da zizoleiñ en o zouez an « disakerien ». Evel just, ne voe roet ar roll dezho. Ha neuze gant piv e oa bet graet an taol ? E latin e vez lavaret : hoc fecit cui prodest ! ». Dre-se n'eo ket difennet skeiñ ar bec'h war ar re a felle divrudañ manifestourien GALV. Etrezomp : daoust ha n'eo ket un dra lu gwelout an drapoioù

gall o tispakañ o zri liv, kerkent ha ma vez un tamm gouel bennak ? Gouel ar Republik bep tro ma vez graet un dra dreist-ordinal ! Poent eo cheñch penn d'ar vazh. Hag ar gwir o deus ar Vretoned da welout o banniel a-istri-bilh ouzh an holl diez Ofisiel, zoken ar prefetiñoù hag an isprefetiñoù.

Ar mennadoù da gas d'ar c'hazetennoù ha d'ar pennoù-bras a voe lennet e brezhoneg hag e galleg, ha lennet ivez ul lizher a-berzh Yezh an trakt a denn da hini Bro-Dreger, evel ma c'hellot merzout aezet. N'eo ket un dro-digezh rik diwar ar galleg hag a seblant bezañ bet an destenn-diazez; met tostaat a ra, ha sklaer eo da vihanañ. O vezañ ma oa graet ar baperenn-vrudez-se evit ar bobl, o deus an aozerien (pe an drourien) lezet a-gostez gant evel Raktres (raktres Manshold), trevadennourien, skinwel (hemañ koulskoude a vez klevet er Radio hag e Breizh o Vevañ, mar ne fazian ket).

Aesoc'h ha buanoc'h e lenn ar bobl ar galleg, evel ma ouzer, met dre zoujañs evit yezh ar Vro e oa bet implijet ar brezhoneg, ar pezh a zo un dra vat. Met petra a c'hell bezañ evit ar bobl-se ar gerioù-mañ : ma vo roet ur plas dereat d'ar Brezhoneg er vuhez voutin ? Gwir eo ez eo bet lakaet ar ger boutin da dalvezout publik, ofisiel, stad (el) . . . Ha forzh penaos ar galleg a oa war an tu all ! . . .

O vezañ m'am eus kerzhet gant ar re yaouank eus Bulien betek Lannuon, e vo mat din merkañ amañ va evezhiadennoù hag ober war un dro, un tamm re-atañ-kont, dreist-holl p'he deus ar gazetenn « LE TELEGRAMME » nac'het rentiñ kont e doare ebet eus ar GERZHADeg-SE.

1 - Un toullad eus ar re yaouank a ao er Gerzhadeg a ouie ar yezh, met un toullad brav ne seblantent ket gouzout kalz a dra, hag e komprener ervat perak e fell d'ar studierien gwelout ar yezh kelennet dezho er Skol. Ar gwir o deus da gement-se. Met ar gwir-se a zo bet dija nac'het ouzh kalz anezho adalek ma oant bihan, gant o zud o-unan ! Evel un tamm amann war an tan emañ ar Yezh o teuziñ buan war billig ar bed modern. Anat eo, ez eo poent bras lakaat kelenn ar Yezh war an dachenn-se eus ar bed a-vremañ : ar Skol e-lec'h m'emañ hiviziken holl yaouankizoù Breizh (sakochennoù ha tout, evel ma lavar ar re gozh !) .

« - Daoust ma ne oa marteze nemet ur c'hwec'h-ugent bennak anezho (120) e rae kement-se ur bagad hir a-walc'h, hag en daou benn e oa ur paotr gant un drapo ruz, evel an hini a vez gant ar re a vez o kas o saout war an hentoù bras. Dre-se e ranke ar gweturioù tremen a bep eil, hag evel-se e veze amzer da reiñ d'an dud a oa enno, paperoù ha traktoù; peurviañ e kemerent anezho a galon laouen en ur hastañ buan zoken diskenn ar werenn evit o c'hemerout primoc'h. Ar pezh a ziskouez n'edont ket (war-bouez unanig bennak hag a c'hrogne un tamm dre ma veze daleet), a-enep d'ar gerzherien. Ha ne oa ket gant an holl weturioù-se niverennoù eus departamantoù Breizh . . .

3 - Rudioù Lannuon avat, a oa didud : ar sul e oa vel ouzoc'h. En antre Lannuon, e Sant-Nikolaz e oa un toulladig tud yaouank o c'hortoz, merc'hed dreist-holl ha n'o devoa ket gallet ober ar gerzhadeg war he hed, dre ma oa klogorennet o zreid . . .

CYMDEITHAS YR LAITH (Kevredigezh ar Yezh) eus Kembre o tiskleriañ edont a-du gant Breizhiz en o stourm. Neuze e voe kanet ur poz bennak eus « AN ETREVROADEL » hag eus « BRO GOZH VA ZADOU » ha diouzh an noz e voe Fes-Noz e Ti ar Bobl, e Lannuon.

DA GLOZAN.

Tu a vefe da abegiñ ar mennadoù kinniget hag o c'haout berr ha disterik. Tu a vefe da abegiñ lavarioù evel hemañ - I ma vo desket Brezhoneg . . . d'ar re o c'hoant ». Met n'eo ket en un taol e vo restaolet o gwirioù da Vreizhiz, n'eus forzh penaos. Kemer atav ar pezh a vo roet ha derec'hel da c'houlenn . . .

Arabat avat, e teufe da vezañ emsav ar yaouankizoù-se strollet dindan anv GALV, evel m'eo deuet da vezañ ar C'helc'hioù Keltiek hag ar Bagadoù hon eus bet gwelet o tiwan evel togoù-tousegeg war-lerc'h ar brezel hag a zo aet kalz anezho da droadañ. Un tamm aesoc'h - ha plijusoc'h - ez eo ober manifestadegoù eget stagañ a-zevri gant studi ar Yezh betek donet d'he mestroniañ ervat hag evit mat.

KLERG.

Levriou hag embannadurioù

DOCUMENTS DE L'HISTOIRE DE BRETAGNE, 1 levr kartoñset, 416 paj., 13x23 gant 40 a skeudennoù : 69, 00 Lur.

Ti-embann : Édouard Privat, 14 r. des Arts, Toulouse 31

1

Embannet eo bet e **Ti Edouard Privat** an oberenn a veze keal anezhi pa zeuas er-maez e **Istor Breizh**. An embannadur-mañ a zegas da soñj eus doare-labourat an Tad Lobineau ket brudet : heñvellec'h embann tri levr in-folio anvet : «*Preuves de l'Histoire de Bretagne*», war-ti e levriou o tanevellec'h an darvoudoù; hag evit ar glaskerien ez eo talvoudusoc'h an tri levr-se. Levriou **Ti Privat** a zo lod eus un dastumadenn-skridoù «*Univers de la France*».

Burutellet hon eus bet dija, en un doare un tammig garv, al levr **Istor Breizh**, skrivañ d'hor menno, re vuan, reizhet-fall, re zigempouez. Enep ar wirionez e vefe an tamall-se evit pezh a sell levr an **Dielloù**. Unan bennak a gavo abeg en dibab-mañ-dibab, un all a vo kersed gantañ o vezañ na gavo an destenn bennak a bouez vras; met perak moulañ a-nevez ur skrid enavezet dija gant an holl hag a gaver e pep levr **Istor Breizh**? Dedennusoc'h ha talvoudusoc'h embann pe adembann ur skrid dibaot pe ziaes da gaout. Da hini pe hini ne blijjo ket kement-se a daolennoù hag a sifroù, dreist-holl pa vez kel eus arboellerezh pe boblañs. Met n'eo ket graet al levr da vezañ lennet penn-da-benn en ur wech. Ul levr-labour ez eo, savet evit bezañ implijet pa vezo ezhomm, ur benveg-labour an hini eo.

Plijus ez eo liesdoare an dielloù, ar skridoù brezhoneg kozh diskleriet mat-tre hag o reiñ un alberz eus ar Varzhoniezh pe eus ar C'hoariva er Grennamzer, e Breizh. Kalz dielloù ivez o sellout an kendraouriezh, an Hentoù, an Arz, an Ijinerezh, ar Gonid-Douar gwechall. Amañ pe ahont skridoù-notered, kontradoù, arroudoù (hirik marteze) diwar skrivagnerien vrudet.

Keuz hon eus avat, o vezañ n'eo ket merket gwir dalvoudegezh eus ar Grennamzer goshañ, na renket gwellloc'h ar skeudennoù kaer-tre a-hend-all. Met al lenner a chomo gant e naon, evel ma vez lavaret, dre ma ne c'hell ket un oberenn a-seurt-se reiñ pep tra pa oa ret, na petra'ta, hag e oa ret kaout ur mizul bennak d'al labour. Ur vengleuz pinvidik a gavo atav aze leun a draoù nevez. Gras d'an oberenn-mañ d'ober berzh.

J.C.

2

GOURC'HAN YUZIKAEI (cf. Documents de l'Histoire de Bretagne paj. 156 sq.)

Lavaromp diouzhtu e talvez evidomp Gourc'han : kanenn-veur, ger heñvellec'h ouz ar c'hembraeg **Gorchan**, kanen en enor d'ur gouron bennak, d'ur penn-brezel. Yuzikael eo anv ar roue brezhon eus ar 7^{vet} kantved a beder evel ur sant; meur a stumm a zo d'e anv : Judikael, Yezekael, ha diawr an anv-se e kaver en deiz a hiziv anvioù-familh evel Jezekel (distaget Yekel), Jikel, Jikello hag all.

Kavout a reer e levr **Documents de l'Histoire de Bretagne** ur studiaden diwar-bluenn an Ao. Fleuriot, war ar «*gourc'han*» e latin, tennet eus skridoù ar manac'h Ingomar eus Abati Lanneven-Veur, diwar-benn Yuzikael. Diskouez a ra anat an Ao. Fleuriot ar gerentiezh etre ar gourc'han-se en enor d'ur roue brezhon, hag ar gwerzioù heñvel, e kembraeg kozh.

38 Merzet e oa bet dija talvoudegezh ar gourc'han-se gant A. de la Borderie en e **Istor Breizh**

(levr, 1-añ paj. 477). Daoust ma'z eo bet skrivet buhez Yuzikael gant ur manac'h, ne c'heller ket sellout ar gourc'han-se lakaet gantañ en e zanevell, evel un dra awenet gant ur spered kristen, pa gomzer gant lorc'h eus korfoù marv an enebourien lazhet gant Yuzikael ha deuet da vezañ boued koun (= chas) guped, brini, skouled ha piked. Evel dre blijadur e roer dimp da glevout yudadeg argwraez intañvezet. Meuliñ a reer Yuzikael abalamour d'an distruj en deus graet war ar Franked a felle dezho bazhyevañ Breizh, da lavarout eo, ober un drevadenn ganti.

Lakomp! Met bez'ez eus kudennoù hag a sav siwar ar skrid-se. Da gentañ al latin, yezh an danevell. Komz a reer eus tri donskrid : daoust hag heñvel ez eo an destenn latin en tri donskrid-se? Al latin roet dimp gant an Ao. Fleuriot ne deo ket latin klasel n'eus forzh penaos, hag un toullad barberekadurioù a zo ennañ; unan hepken a zo bet merket gant an Ao. Fleuriot, hag a vefe aezet da reiñ hep terriñ mentadur ar gwerzennoù 18-19 Armigeri(s) ha post-se leti euntibus (e-lec'h exeutes). Met kent reiñ tra pe dra e vefe mat kaout an destenn (evit ma'z eus toir anezh) keñver-ha-keñver.

Graes ez eo gout hag-eñ ez eo ar ger «*in pugno*» (eus pugnus : meilh-dorn) eo a zo da vezañ lennet pe «*in pugna*» (= en emgann), evel n'en deus komprenet an Ao. Fleuriot. Setu al latin evit ar gwerzennoù 13-17 :

«*Intera quoque more bellatorum in pugno robustorum contra adversarios pergebat ad bellum.*»

Mar ne deo ket ur fazi e kinnigen kompren an destenn evel-hen :

Hag awechoù e-giz ar vrezelourien kreñv o dorn ez ae da vrezelekaat a-enep e enebourien.

Ar ger «*pugnus*» amañ o treiñ ar ger a gaver alies e kembraeg kozh : **Angad** = dorn, (tapout krog gant an dorn. Kreñv o dorn neuze pe... solud o c'hrog !

Ar verb «*hastabat*» ne gomprent ket, L. Fleuriot a dro anezhañ «*hastañ a rae*». A. de la Borderie : c'hoari a rae gant ar goaf, goafata a rae...

Bez'ez eus un dra hag a vo un tamm komfort evit renerien gelaouennoù, ispisial, renerien gelaouennoù brezhonek. Ar pezh vi-koujou : milui (= skoufed) troet e galleg : merles (= moult'hi). Moult'hi o tebriñ kig ar re lazhet ! Ha bezañ an Aotroù Fleuriot studiet ar ger-se «*skoul*» en e c'heriadur brezhoneg kozh !

Talvoudus ez eo evezhiadennoù ha notennoù an Aotroù Fleuriot o keñveriañ an destenn ouzh frazennoù zo eus **Canu aneirin ha Llywarchen**. Tu a zo avat da gompren frazennoù kembraeg'zo en un doare disheñvel diouzh e hini.

C. Aneurin g. 420 : rieu ryvel chwehth : Seigneurs au rire guerrier, eme hon oberour. Kinnig a reomp war-lerc'h Ifor Williams : Priñsed o c'hoarzhiañ en emgann.

Er baj. 159 ez eo merket fall an arroudad : C. Aneurin 124 : lenn 1241. Ha neuze, gwell ganin «*bleizi*» evel troidigezh ar ger «*gywyddgwn*» eget «*chiens sauvages*» dreist-holl pa'z sos diaes gouzout penaos ez eo aezet ar ger-se : gouez-koun, pe gwez-koun, (chas gouez, pe chas-koad).

Klerg.

AL LIAMM niv. Meurzh-Ebrel 1972,

koumanant : Mme Chérel, Al Liamm, K.R.P. 2184-34 Roazhon, 30 Lur.
Studieren, soudarded, kloareged : 15 Lur.

Un niverenn dev, tremen 10 pajenn dezhi, Gouestlet penn-da-benn koulz lavarout d'ar Vretoned aet da Anaon nevez'zo : Drezenn, Even, Kalvez Pennadoù sinet gant R. Hemon, L. Fleuriot, gant Langleiz, Gwilcher, Kenan Kongar, Youenn Olier, Joela Kermaol, gant an adembannadur er penn kentañ eus Brezhoneg brudet Y. Drezenn : **Nozvezh Arkuz**, bet reizhet gant an oberour

39

e-unan. Ha neuze pennad L. Andouard diwar-benn ar C'hoariva Brezhonek, e Pariz... Peadra da lenn ha da brederiañ... War-lerc'h niv. 72 **Barr-Heol**, Pask 1972, e vo kalz aesoc'h komprenn buhez hag oberoù an Aotrou Kalvez, ha diwall diouzh diskleriadurioù avanturus un tamm. Da skouer ar pezh a lavar Youenn Olier diwar-benn **Skol divyezhek Sant Erwan**. Gwir abeg nemetañ d'ar skol da vezañ serret e oa bet al Lezennoù nevez war ar Skolioù Prevez. Gwenderioù anat avat, a oa stag ouz ar Skol : ur skol evit paotred vihan hepken. Ret e vije bet kaout ur skol heñvel e-kichen evit ar merc'hed bihan. Met er sistem gall (er reizhiad kelenn gall, gouez da Y. Olier) d'ar mare-se e oa tu da gaout skolioù divyezhek, e-kichen bremañ ne c'hellit kaout na skolioù divyezhek, na (nebeutoc'h c'hoazh) skolioù unyezhek brezhonek. Evel m'edo e c'helle **Skol Sant Erwan** padout ha bezañ skouer evit sevel skolioù all heñvel. Ar gwashañ enebiezh e zo deuet eus perzh «Tadoù, Breudeur, Bugale» ar skritur ijinet war-dro 1954. Sellit da skouer ar pezh a lavar Barr-Heol paj. 11, 12, 13, 14 (op. cit.). Met c'hoazh ur wech, ar c'hontradou eire ar Gouarnamant hag ar Skolioù prevez eo a roas taol ar marv da Skol Sant Erwan, Ploueg-ar-Mor; panevet ar c'hontradou e vije marv kalz a skolioù prevez a-benn bremañ, ha ne welañ ket penaos he devije gallet planedenn Skol Sant Erwan bezañ dishañ.

Klreg.

TRI ANV-LEC'H PLENAOD, PLOUELOU, PLOUREC'H

Plenaod

1

PLENAOD (Plaine-Haute). Meur a wech ez eo studiet anv ar barrez-se, dreist-holl gant Teofil Jeusset (Doue d'e bardono!) ha J. Gwegen (Hor Yezh, niv. 36, paj. 13-14 niv. 33, paj. 29, niv. 36, paj. 14).

Ar barrez-se a zo eus kanton Kintin. Evit Jeusset ez eo sklaer ar gudenn : Plaine-Haute a zo diwar al latin **Plana Alta**, da lavarout eo, uhelgompezenn, ar pezh a glot e gwirionez gant stumm an dachenn m'eo savet ar vourc'h warni : uhel ha plaen. Evit J. Gwegen e vefe kentoc'h anv ar barrez da vezañ komprenet evel **Ploueneg, Plouenog**, hag an anv-mañ bet treuzintenet a gaver skrivet **Plenot**, e 1250, hag ac'hano neuze ar stumm latin **Plana alta**.

Dindan baeroniezh an Abostol Sant Pêr emañ ar barrez, ar pezh a ziskouez ez eo ur barrez eus ar c'hoshañ, da vezañ lakaet e-touez ar parrezioù koshañ. Setu perak e c'heller en em c'houlenn hag-eñ n'eo ket **Plou, Ploe, ple** eo a zo e penn-kentañ hec'h anv. An eil lodenn avat, a zeu da vezañ aes da gompren, mar dalc'her soñj eus anvioù lec'hioù all, evel parrez **Duod**, kanton Kallag, **Gwennod**, er c'hoad a-us da draoñienn ar Blañvoezh e Bro Wareg, ha moarvat **Kerod**, etre Korlé ha Gwareg. **Od** emañ eo ar ger **aod**, na petre'ta, diwar al (uhel) hag o talvezout bremañ **glann ar mor**. **Duod** = Tosenn Du, **Gwennod** = Tosenn wenn, **Kerod** = ker uhel, kêr an dosenn.

Neuze **PLENAOD** = Parrez an Uhel, pe war an uhel ?

+

Kudenn an **N** e-kreiz ar ger n'eo ket eus an aesañ da ziskleriañ : tu a zo evel just da gompren : **Plou-en-aod**, gant lakaat ar ger-mell etre Plou hag Aod, met betek peloc'h ez eus aotre d'hen ober? Daoust hag ne oa ger-mell ebet e brezhoneg d'ar mare ma oa savet ar barrez-se **PLENAOD**? Pe daoust hag ez eo bet lakaet aze diwezhatoc'h da aesaat an distagadur? Bez'ez eus parrezioù all ha ne dint ket bet studiet a-walc'h d'hor meno, evel da skouer, kichen Pempoull **Plæraneg, Porneleg**, (Ploubazlanec, Ploubannec) hag a vefe kalz aesoc'h kompren ar stumm iskis o deus bremañ, gant soñjal ez eo bet lakaet un dro bennak ar ger-mell etre an div lodenn eus anvioù an div barrez-se : **Ploe-en-Bazlanec**.

Bezetao a veo, ar wirionez a oa gant Jeusset pa ginnige skrivañ **Plenaod** anv ar barrez-se bremañ el lodenn romanek eus Breizh.

Dielloù J. Gwegen ne seblantont ket koltañ ar pezh a gaver war al lec'h. Ret e vefe gwirikeaat ar pezh a lavar, rak setu emañ ar stummoù roet gant an Ao. Koufon (Répertoire Eglises et chapelles du diocèse de St-Brieuc & Tréguier, 1939, paj. 292) : Sant Inouen (gwechall, eme Goufon, Saint Ennogen). Ar stummoù poblek er barrez, en deiz a hiziv, a zo : **Innoé**, skrivet a-wechoù **Inouais** (= Inwe).

+

Plenaod, e karfemp menegiñ anv iskis-tre ur c'harn eus ar barrez-se e-lec'h ma vez savet abaoe ar XVI-et kantved da nebeutañ, **Santez Anna** : Sainte Anne du Houlin. War ribl ar dachenn (pe **Gwed**, mar kirit) emañ ar gêriadennig hag ar chapel. Forzh pegen risklus ez eo ziskleriañ anvioù hep kaout dielloù kozh e kinnigomp kompren treiñ an anv-se e **Santez Anna** : **Houlenn**, da lavarout eo ar C'hozh-Lenn. En deiz a hiziv ez eo gwregel ar ger **lenn** =stank ar moarvat ez eo anv-se a gaver e Bro-Wened, e parrez Kistinid : **er Goslenn**. Hogen ar ger **lenn** n'eo ket bet atav gwregel e brezhoneg hag e kembraeg ez eo gourel : **Liyn**. Ar prad don a zo eno war ribl ar Goued a zo bet, hep mar ebet, ul lenn, un amzer'zo bet.

Gag en ur skouer diwar ar skritur a gavomp e **Monuments du procès de la canonisation de Charles de Blois** (Prud'homme, St-Brieg, 1921) e-lec'h ma lenner paj. 424 Domino Menguido EN COZ, ha paj. 434 Menguy de **Hen hoz** (sic!) e kinnigfemp (**Santez-Anna**) **en hoz lenn**, hag aes-tre ez eo trenen diwar ar stumm-se d'ar-stumm **houlen, houlin**. Techet omp da grediñ ez eo ar stumm-se eus ar XV-et kantved. Miret eo bet evel-se dre n'edo mui an dud evit kompren ar ster anezhañ, da lavarout eo, d'ar mare ma voe lazhet ar yezh vrezhonek gant ar yezh romanek, hag e tiskouezhfe ivez an anv-se ez eo chomet bev ar brezhoneg er c'hornad-se betek ar XV-et kantved da nebeutañ.

2

Plouelou

PLOUELOU - PEURLOC'H - PLELO.

Geriadurioù kozh Roparz Helon a zo : **Peurloc'h** evel skritur anv ar barrez-se eus kanton Kastellaodren, parrez anavezet dindan ar stumm ofisiel : **Plelo**. Lezet en deus Roparz Hemon **Peuloc'h** da gouezhañ evit heuliañ labourioù T. Jeusset. Hervez Jeusset ha Smith (Toponymie Bretonne), war-lerc'h J. Loth, emañ marteze en eil lodenn eus ar ger-se an anv a **Elou, Elwy** da dostaat ouzh ar c'hembraeg **Llanelwy** (St Asaph). Fur-tre ez eo an diskleriadur-se hag e c'heller sellout ar stumm **Peurloc'h** hag a zo bev hepken e genoù ar vrezhonegerien, evel un distresadenn, un trefodadur, mar kirit, ha netra ken. Mat eo koulskoude klask hag-eñ ne vefe ket un abeg bennak d'ar «stumm trefodet-se». Anaf eo, ne vez ket atav un anv-den pe un anv-sant da heul ar ger **PLOU**; re niverus az eo ar skouerioù, evit ma kemerfemp ar bonn d'o menegiñ. Menegomp adarre ar ger **Plæraneg** diwar b-**Ploubazlanec** e-lec'h ma eus anv ur «valaneg». Setu perak ne vefe ket fall gwelout a dostoc'h hag-eñ n'emañ ket ar ger **loc'h** e **Plouelou** ! War ribl ar stêr-Lañv emañ ar barrez-se, ha ne vefe ket souezhus e vije bet ur wech bennak ul loc'h eno ! Plouelou : Parrez-Elou, parrez-al-Loc'h ?

3

Plourec'h PLOULEC'H - PLOUREC'H

41 Ar barrez-mañ a zo ur barrez eus kanton Lannou, diouzh tu ar c'huzh-heol, hag unan eus ar re

C'huzh-heol, hag unan eus ar re vrudetañ e departamant Aodoù-an-Hanternoz (22) e-touez an arkeologourien, en askont d'an dismantrou kozh a gaver enni, el lodenn anezhi anvet AR YEODED, er beg-douar etre Traezhenn ar Werc'hez hag ar Stêr-Leger, en aber ar stêr-mañ.

Ur barrez kozh ez eo evel m'hen diskouez hec'h anv e-unan, hag ivez paeroniezh an Abostol Sant-Pêr. Daoust petra a dalvez an anv-se avat? Amañ hon eus ur gwall-grogad da gaout, nemet marteze e raimp kavadennoù dic'hortez-krenn d'hon digoll eus hor poan.

+

Distaget e vez PLOUREC'H gant ar vrezhonegerien, ha skrivet e vez PLOULEC'H. N'eus tu ebet da c'houzout abaoe pegeit'zo e klevet PLOUREC'H, nemet ez eus un dra bennet c'hellomp ket mont a-enep dezhañ : an testiñ a gaver e Prosez Santelezhadur Sant Erwan (Procès de canonisation, de la Borderie) paj. 78, pa lenner e latin **Plebs loci** ; parrez (añ) lec'h, ar pezh a ziskouez anat ez eo **Ploulec'h** ar stumm kozh. hep derc'hel kont zoken eus ar skrivitour ofisiel Ploulec'h. Ar bouez-mouezh a zo war an eil silabenn **Plou-rec'h**. Dav dimp eta dezhañ ar ger diwezhañ-mañ **rec'h - lec'h**.

Lezomp a reomp a-gostez ar stumm REC'H dre n'eo ket ar stumm kozh, evit selloc'h pishoc'h ouzh ar ger LEC'H.

Treñ LEC'H e latin LOCUS (lec'h, plas) ne sinifie seurt ebet, anat deoc'h. Bez'eo da daou c'her e brezhoneg kozh dezho sterioù heñvelik : **Lia** ha **lec'h**. Lia a gaver c'hoazh en anvioù-lec'h evel da skouer : **park al lia** (Enez-Veur, parrez Pleuveur-Bodoù), **ti-lia** (Trébourden), **krec'h-lia** (Serwel), **lia** o talvezout taol-vaen, hentoù pe alezioù-komandoned. Ar ger all : **lec'h**, kar d'ar gresianeg **Plaks** (tro-c'henel : Plakos), hag o talvezout, hervez e orin : **maen-plat**. Bev ez eo ar ger e kembraeg, dreist-holl evel anv ar **Maen-To**, ar vein-skilenn. **E brezhoneg ez eo marv, nemet e vefe bev bepred en dro-lavar** : Droug-al-lec'h, implijet evit bugale gwan eskern o c'hein; an hevelep tro-lavar a gaver end-eeun e kembraeg. Da wellat ar c'hleved-se e vez (e) staket ar bugel ouzh ur garreg! Luedan a-walc'h ez eo evelato ster ar ger LEC'H, e kembraeg kozh da skouer, hag o talvezout Maen Bras, Karreg Vras, evel en anv **harlec'h** (evit Harddlec'h) : Karreg Kaer.

Ar ouizieien a ra gant ar ger LEC'H evit envel ar pezh a naver ivez : ar «pilieroù» pe ar «peulvanoù» galian, anezho peurluviañ Mein Fallik, da lavrout eo, mar permit diñ ober gant ur ger nevez : **mein ezal-gourheñvel** (membre virile), hag a veze graet didoù'zo en-dro dezho, en enor d'ar Vuhez ha d'ar C'hrouñ-Bugale. Ar suert **mein-se** a vez enoret ha kehelet bepred e Bro-Indez.

Mein evel-se e gaver a-fonn, e Bro-Dreger (hag e lec'h all !) nemet ne oar mui an dud petra ez int. E **Ploulec'h**, pa gomzomp eus Ploulec'h, e rankomp ober eus ehan dirak an hini a zo penn ar vered, sterniet er voger, gant ur groaz-vaen war e benn, ur maen ront hag a zo diaes gouzout an uhelder gwirion anezhañ, o vezañ m'eo plantet don a-walc'h en douar ha m'eo bet uhelaet an hent, ur maen bet implijet marteze evel maen-miltir gant ar Romaned. Ur peulvan pagan eta, bet kristenet dre lakaat ur groaz war e benn. Ur peulvan hag a ranke bezañ war ribl an hent kozh : dre-se Karaez - Ar Yeoded ha dre-se aes-tre da welout. Hep en em avanturiñ re e c'heller kompren PLOULEC'H evel «Parrez al Lec'h». Met daoust m'emañ al LEC'H-se o-kreiz ar vourc'h, stok en iliz-parrez, e penn ar vered, tre war ribl an hent abaoe kantvedoù ez eus tu da gaout kaeroc'h. Met ya ! Selaout !

Evel m'hon eus lavaret uheloc'h e talvez da gentañ ar ger LEC'H = Maen Plat. Ha mar befe neuze war zouar PLOULEC'H ur maen plat gouest da zedennañ evezh ar Vretoned o tiskenn war-dro dibenn ar V-et-kantved, en aber al LEGER pe e deroù ar VI-et? Ur maen brudet dre ar c'hornad a-bezh? Deuit ganin neuze betek ar YEODED, hag e kavot ur maen herverk-tre, ha fizians am eus e vrot a-du ganin daoust d'ar martezoù a renkiñ lakaet da heul va diskle-riadoù. N'eus forzh penaos, tamm keuz ebet n'ho pezo, rak unan eus kaerañ troioù a

c'heller ober e Bro-Lannuon ez eo tro ar YEODED, ha dirak aber al Leger e c'hellot huñvregl gwalc'h ho kalon er Fenikianed o tonet eno d'ober kenwerzh, er Gelted o tiazazañ ur c'hamp war an dorgenn **haez d'ar laod**, er Romaned oc'h aloubiñ ar c'h'hemad hag o sevel ur gêr nevez 'giz ar c'h'herioù roman-galian, er Vretoned o **tozarañ goude** e touez dismantrou ar gêr distrujet, evit adsevel ur Vreizh Nevez, en Normanted o c'hervel o doueed pagan da gaout ar c'hras da verniñ en o bagoù pinvidigezhioù Bretoned Bro-Lannuon, ha neuze en Tad Mañer, an Tad Mad o prezeg d'ar milieroù a dud deredet eus pevar c'horn ar Vro d'e selaou o prezeg diwar ar **min plat**.

Ar **min plat** emañ o paouez skrivañ e-giz ma vez distaget e Bro-Dreger. D'am soñj, ma c'hellfed kompren ster ar Maen-se, e vefe dispaket sekredoù ar YEODED, ha sekret ar Werc'hez gourvezet en **ha gwel**, a-us d'an aoter, er chapel savet en hec'h enor, koulz lavarout dindan ar **maen-plat** se.

Disse daontus ez eo diluziañ istor ar Yeoded, ken rouestlet evel ma'z eo bet gant faltazi istor anezho, ha dreist-holl gant an dud-a-iliz. Rouestlet c'hoazh dre faot tud'zo ha na welont en **ha gwel**, nemet ar gêr roman, hag a zeu da furchal evit dizoleiñ ur podad pezhioù-moneiz kozh eus ar stêr ar Romaned. 400 vloaz d'an hirañ eo bet ar Romaned eno, hag evito emañ holl c'h'herioù-mat ar furcherien !

An **maen** ar Yeoded roet d'ar c'horn-bro, a zeu diwar al latin izel **civitate(em)**; a-du gant-se emañ an **ha gwel** brezhoneg. Pegoulz avat? Kement-se a-barzh ar fin, en deus nebeut-tre a dalvoudgezh peurluviañ o klask war-lerc'h ar **maen plat** ! Merkomp evelkent kement-mañ : ar Yeoded a vez graet eus ar Beg-Douar, eus ar porzh-mor hag ivez eus ar stêrig, ar wash-dour, o tispartiñ Ploulec'h diouzh Plouilio hag a gouezh e pleg-mor ar Werc'hez. A-hend-all, pa gomzer diwar-benn ar Werc'hez e lavarer peurluviañ : Itron-Varie ar Gozh-Yeoded. A-wechoù zoken e klevet Yeodeg. Droug ha fent a veze en Arzhur de la Borderie, pa gomze eus ar Yeoded hag eus ar Gozh-Yeoded, anvioù ijinet, emezañ, gant ar Gloer.

E gwirionez, ne oar den ebet peseurt anv a oa d'ar Yeoded, en Henamzer. De la Borderie a oa a-du gant Mannatias, e-lec'h ma oa ur gwarnizon roman : Perventores. Tu ebet evel just, da c'houzout en un doare diarvar. Betek ar Reveulzi vras e veze graet e latin «Pagus Castell» eus ar c'hornad-bro etre Lannuon ha Montroulez : Castellum o vezañ anv ar Yeoded, pe gentoc'h, o togas da soñj e oa bet eno ur c'hastell da lavarout eo, ur «C'heñveloc'h». E brezhoneg e veze implijet an daou stumm-mañ : **Pou hastel** ha **Pou-Gastel**, hervez de la Borderie.

Ma l'neuze o devoa c'hwitet ar Vretoned war an anv da reiñ d'ar barrez a reomp, ni **Ploulec'h - Plourec'h** anezhi : Plougastell a vefe bet eus ar c'hentañ, ne gav ket deoc'h? Nemet e ranke bezañ un abeg a-bouez evit ober dezho dibab an hini o devoa dibabet !

+

A-benn bremañ hon eus bet amzer da grat gant an dosenn a zo a-us d'ar chapel, war an tu kleiz. Setu ni war ar **min plat**. Kentañ hon eus da ober (hag a raimp hep mar ebet) e vo ober ur sell war Bae Lannuon...

... Met n'eo ket evit-se eo am eus ho kouviet da bignat war ar **min plat** ! Ur pezh maen plat, sintret gant mein ponner dindan, ur maen heñvel ouzh un daol-vaen. Tu ebet da faziañ : ar maen-se a zo unan eus ar pezhioù kerreg naturel plat a zo eno en o sav, ha diskaret eo bet a-ratozh-kaer gant an dud ha lakaet plaen ganto. Evit petra? Amañ e krog lodenn ar «martezoù» em danavall. Daou dra hepken a rin deoc'h teurel evezh outo : ar **rod** skultet war ar **Min Plat**, hag an **tri goch** toulllet enañ.

Ur **rod**? Marteze ! Ur c'helc'h graet madik a-walc'h, daoust ne doo ket keic'hiek diski, evel ma c'heller aprouiñ gant ur c'hompaz (ur c'helc'hier), met ne doo ket fall evelkent. 16 skm he deus ar «Rod»-se. Div linenn a-serzh an eil war eben a seblant merkañ ar pevar-roud-avel, hag e

seblant ar skinoù all diskouez roudoù an avelioù all. Neuze ur **rozenn-an-avelioù** ? Marteze ! Met neuze ez eb bet skultet ur pennad brav goude ma oa bet ledet ar **min plat** eno !

Ur vojenn mat da venegiñ ez eo ar gredenn e oa bet kizellet e memor eus an Tad **Maner** pa oa deuet d'ar Yeoded da brezeg, er XVII-et kantved, da ziskouez e oa evel an heol (an heol) ? sell'ta), o sklerijennañ an dud.

A-barzh ar fin, ar gwellañ da ober ez eo sellout pizh ouzh ar «**Rod**» ha klask tennañ anezhi ar pezh a c'heller. Hag e c'heller, gant un tamm faltazi, tennañ ur bern traoù avel ma'z it da welout : an Heol, al Loar, ar Mizioù, Deizioù ar Sizhun hag all.

An Heol ? Mar ne deo ket ar c'hlec'h ur skeudenn eus an Heol, neuze am eus kavet va oremus. Tennit kuit bremañ an div linenn a-serzh an eil war eben hag a verk da lanternoz, ar C'hreisteiz, ar Reter hag ar C'hornog, hag e kavot 12 skin : an 12 miz. Dindan el linenn Kornog-Reter hag a-us dezhi, grit ho kont : 7 & 7. Deizioù ar sizhun. Met 7 & 7 (7 deiz) 14 : un hanter-loarvezh. Met peogwir hon eus da ober amañ gant ur c'hlec'h ez eo met stimp gwelout al LOAR en he c'hant : ar 14-se o verkañ ar pevarzek deiz ma vez o krouñ. Anat eo hon eus d'ober gant Relijion ar Sklerijenn, Relijion ar Vuhez, gant ur meneg kristial evit ar merc'hed, en askont d'al Loar.

Pelloc'h c'hoazh e c'heller mont. E-touez an traoù o sellout ouzh Relijion ar Vev amañ ar «**c'hlec'henoù**» (an diskoù) hag ar pezh a anvñ «**broudoù**» da lavarout eo, pikernenoù : an daou dra o vont asambles, pa'z int un afer a **seksologiezh**. Ne oa tu ebet da biket en o sav ar seurt broudoù er Min Plat, neuze e c'heller kompren ez int bet skeudennet en o gourvez, hag ar seurt broudoù-se emañ ar beg naezho o kejañ e-kreiz ar «**Rod**», hag ar penn jedan anezho harp ouzh ar c'hlec'h e-unan, ouzh kant ar rod.

Ha bremañ an **tri goch**. Diouzh ar sell kentañ e c'heller soñjal ez eus bet klasket tilhañ ar Maen da eeunaat ar bord anezhañ. - eun a-walc'h ez eo koulskoude - ha lezet neuze al labour war e gement all. Gwir eo ne hañval ket ar c'hochoù-se bezañ bet uzet nemeur gant an amzer. Hogen setu amañ peadra da brederiañ; e lec'h all, e Pennmarc'h da skouer, er Poullgwenn-Bihan, e kaver ur maenhir gant **tri goch** warnañ ivez. Kement-se neuze a c'hellfe sikour ar ouizieien da amzeriañ ar **min plat**, da lavarout pegoulz ez eo bet laket eno en e c'hourvez.

Ha ma vefe d'ober amañ gant ur **gwele** ? Ur gwele kalet n'eus forzh penaos ! Un dra da vihanañ o klask skeudenniñ ur **GWELE** ? Ha gwelout er **min plat**-se an orin eus an devosion d'ar Werc'hez en he gwele a zo he chapel, dres dindanan ?

Marteze e leverot din : «**C'hwi ne vezit ket pell o treiñ ur Maen Plat e gwele** !» Ne lavarint ket deoc'h e c'heller, gant un tamm faltazi gwelout stumm ur c'horf en e c'hourvez, er **min plat**, rak evel ma ouzoc'h gant koulskoude e vez graet ramzed, tourioù ha kestell ! Met koulskoude arabat ankounac'haat ur ger hag a dosta a-walc'h ouzh hor ger **lec'h** : ar ger **Le**.

Ar ger **Le**-se a gaver end-eeun er ger **gwele = gou - le**, hemañ : **Le** o tonet diwar ur wrizienn o talvezout : bezañ gourvezet, astennet, ur ger kar d'ar ger latin **lectus** (gwele) ha d'ar gresianeg **lec'hos**. Ne lavarint ket deoc'h e veze graet **lectus** eus ar **min-plat** gant latingourien ar Yeoded, en amzer an impalaered, peogwir n'ouzon tamm ebet, ha den ebet ne ouezo biken moarvat ! Nemet e foll din merkañ e oa un digarez bennak da lakaat ar **min plat** eno en e c'hourvez, tra ma kaver ur **maen ront** en e sav, e bourc'h Ploulec'h !

Grit ho soñj ! Gwashañ pe gwellañ pezh a zo e klot an traoù penn-da-benn !

Gant ar **min plat**, diaester ebet : kavet eo ar poell, n'eus mui d'ober nemet dibunañ ar c'helad rouestlet evit pezh a sell ouzh Istor ar Yeoded hag Istor Plourec'h. Pe mar kavit gwell, setu kavet ur stern hag aes klenkañ emañ an darvoudoù pennañ en em gavet gant Yeodediz ha Plourec'hiz a-hed ar c'hantvedoù :



CHAPEL AR YEODED HAG AR MAEN-PLAT



SKEUDENN SKULTET AN HEOL HAG AL LOAR

- 1) Ar Min Plat pe al lec'h : pennlec'h an devoision d'ar C'hrouiñ-Bugale.
- 2) Ar Romaned o kaout war ar plas, e Mannatis, ur relijion heñvel, lakomp, ouzh hini Kubele.

3) War-dro ar V-et kantved, distrujadeg ar gêr-se gant ar Varbared, Daoust hag amzer o devoa bet «Kastelliz ar Yeoded» da anaout ar Relijion Gristen? Kavet ez eus bet, er Yeoded, pezhioù-moneiz eus amzer an impalaer TEODOZIUS (+ 395). Daoust ma talc'he ar Relijion gozh he c'hrog gwashañ ma c'helle e veze kavet un nebeudig kristenien, un tamm dre-holl. Gallout a reer zoken, hep aon da faziñ, e oa deuet ar vrud eus ar Relijion Nevez betek ar Yeoded; porzh-mor, kazarn soudarded, hag o kaout darempredoù a-hend-all gant kêrioù an Arvorig. Forzh penaos ne c'hellent ket bezañ stank. War-dro ar bloaz 500, Tuwal (St Tual) o tizezañ eskopti Landreger, A-benn neuze e oa rivinet ar Yeoded, hag ar Vretoned ne gredent ket chom re dost d'ar mor : bourc'h Plourec'h a zo ul lev diouzh ar mor, ar barrez nesañ : Plouilio, ul lev hanter diouzh ar mor ivez. Perañ e vefe deuet Tudwal da tizezañ e eskopti en ur gêr varv? Ma oa bet kristenien «roman» er Yeoded e veze evel just, ur beleg bennak pe un eskob «misioner» bennak o tonet d'o bizitañ. Setu tout ar pezh a c'heller da lavarout. Ha mar doa bet dedennet Tudwal gant brud ar gêr rivinet, e welas a-walc'h n'eo ket eno e vije ar gwellañ evitañ sevel e eskopti. Ar wirionez a zo gant an Istoreurien, pa nac'hont krediñ e oa bet eskoptioù e Goueled Breizh a-raok ma oa diskennet ar Vretoned en Arvorig.

Daoust ma oa rivinet ar vro ha diboblet e oa chomet bev brud ar MIN PLAT pe al LEC'H, mar kirit, ha pa wennas ar Vretoned nevez diskennet en Arvorig reiñ un anv d'ar barrez a zo deuet da vezañ PLOULEC'H - PLOUREC'H ne oa ket ret dezho terriñ o fenn : gant al Lec'h-Gwele Plat, er Yeoded, hag al Lec'h-Paulvan Ront o devoa peadra da grouiñ un anv nevez. Ha kement-se a dennfe da brouiñ n'eus bet biskoazh parrez ebet er Yeoded, peogwir e oa an div «Lec'h» en hevelep parrez.

4) Ha neuze ITRON VARIA AR GOZH-YEODED ?

Evel ma ouzer e oa bet chomet bev e-pas hir-amzer, zoken e-touez ar gristenien, Relijion ar Vein, e Breizh-hag e lec'h all- hag e kendalc'he ar bobl d'ober profoù dezho ha d'ober gouelioù ha lidoù en-dro. E Sened-Iliz an Naoned, e 658 e voe gourc'hemennet ober toulloù don evit skeiñ enno ar vein a veze bepred enoret ha kehelet gant ar gristenien. Ne oa ket aezet ober kement-se gant MIN PLAT AR YEODED ! Met n'eo ket doaes soñjal e kavas Eskibien Landreger hag e veleien brav-mat an tu da ziskoulmañ ar gudenn evit ar Yeoded : kristenañ an devoision d'ar MIN-PLAT dre ober d'o zud fidel enoriñ an Itron-Varia, Mamm ha Gwerc'hez. Ha lesanvet anezhi ITRON VARIA AR GOZH-YEODED. Hag ur wech ijinet ar ger-se (hag a oa gwir hervez an istor !) : KOZH, ne oa mui nemet ur gammed da ober evit tronañ ar Werc'hez e-touez Paganed kantvedoù kentañ an Oadvezh kristen ! Ha steuiñ neuze tamm-ha-tamm, e-skeud marvailhoù ar Grennamzer : ar Gall, Istor Jozeñ Arimazea, mojenn ar Werc'hez a a zlee da wilioudiñ (Virgo Paritura). Ha diwar skouer ar gizioù hag al lidoù a veze graet en-dro d'ar MIN PLAT, ha diouzh ar mare ma veze graet ar gouelioù brasañ ez eo bet kempennet da skouer NOZ KENTAN A VAE, da zigeriñ n'eo ket Miz Mae, evel just, met DEIZ KENTAN AN HANV (peogwir ez eo gant deiz kentañ a Vae e kroge an Hañv) : Ha Gouelioù BELTENE, gouelioù an Tan hag ar Gouloù eo a zigore an hañv evit ar Gelled ha Kala-Mae evit al Latined.

Noz kentañ TVae a vez graet bepred e Chapel ar Yeoded; ha a-nevez'zo e vez kaset ar prosionoù war grec'h, a-us d'ar chapel tre e-kichen ar MIN PLAT, pa n'eus tu ebet da vont etrezek an aod a-dreuz al lanneg, en askont d'ar gweturioù-touristed. N'eo ket diaes asgwelout dre ar spered ar prosionoù pagan o deus savet en Henamzer an dorgenn-se. Ankounac'h et e oa ar MIN-PLAT, met an Hengoun a zo chomet bepred en isemkiant ar Bobl evit Klod en Itron-Varia.

Lizhiri

I

Bourdellez, Yaou-Bask 1972...

- 1) *Mat-tre avat ! N'eo ket displijet din niwerenn BARR-HEOL !*
- 2) *Ar fourbi a zo er gerioù :*
- 3) *Ar fourbi hag a dalvez : bet c'hoariet un dro dezhañ, e-lec'h fourbilhet hag a dalvez : strafuilhet.*
- 4) *Ar skrid : Me a voe difennet ouzhin komz ouzh ar veleien hag al leanezed, en eskopti Kemper.*
- 5) *Ar baj. 14 ez eo masket ar pezh a c'hoarvezas e 1958 hag ar pezh a c'hoarvezas e 1971...*

Respont :

- 1) *Mat-tre ez eo bet miret distagadur an ilh e Bro-Lannuon ha kaer am eus bet selaou biskoazh n'en eus klevet distagañ Fourbilhet. Setu perak e kave din e oa dav skrivañ « fourbi ». Meur a ster en deus ar ger-se levezonet gant ar galleg « fourbi ». Heñvel a ran gant ar ger « todion » hag ar verb « todioniñ » pa ne glever nep lec'h ebet nemet an distagadur-se ha n'eo ket « todilhon » hag a talc'hin ken na vo diskouezet anat emañ ar gaou ganin...*
- 2) *N'en devo ket muioc'h ar gwir Eskob Kemper da zifenn ouzh an Aotrou Bourdellez da gomz ouzh ar veleien hag al leanezed eget ouzh ar bobl; peadra da ober ur prosez dezhañ dirak an ofisial.*
- 3) *Marteze n'eo ket sklaer-sklaer an destenn' hogen fellout a rae din diskouez e oa bet strizhder-spered beleien'zo e Kembre unan eus an abegoù a reas d'an Aotrou Kalvez (Doue d'e bardono) en em yenañ ouzh Kembre.*

KLERG.

2

Brest, Mae 1972.

... E-touez ar c'hudennoù hag a garfen gwelout studiañ war VARR-HEOL emañ kudenn al Lidoù-Sakr. Ar veleien a ra o fenn, ha da sul zoken ne vez na lavaret na kanet ar Gredo...

Y. S.

Respont.

Setu aze ur goulenn hag a zo diaes-kaer reiñ ur respont dezhañ. N'emañ ket e karg BARR-HEOL lakaat urzh war ar poent-se. Diwezhatoc'h e vo gwelet evelkent ! Met da c'hortoz, setu un nebeut fedoù, d'hor c'henskrivier ha da lennerien ar gealouenn-mañ d'ober o soñj.

An Aotrou Martin, bet arc'heskob Rouan ha bremañ e retred e Lourda (henezh eo a oa bet kollet er menezioù e-pad daou pe dri devezh warlene, rak daoust d'e oad e plij dezhañ krapat ar menezioù) a oa d'ar mare-se e penn Komision al Lidoù-Sakr evit Bro-C'hall. Un deiz bennak ma oa padet an Eskibien e Pariz, e klemmas dre ma ne sente mui den ebet ouzh ar respont noù, ha gant an droug a oa ennañ e lavaras en ur sevel diwar e gador : « Keveno ! Lakit un all em flas, mar kirit » hag eñ o tapout toull an nor hag er-maez en ur strapañ an nor war e lerc'h.

... Kalz a frankiz evit gwir, a zo bet roet evit reiñ tu da arnodit stummoù nevez hag evel just, pa vez roet un tamm frankiz e vez kemeret amploc'h eget justoc'h. Da bennoù an Iliz, mar gellont, ez eo merkañ ar mudiñ, betek pelec'h ez eus aotre da vont. N'eo ket aes bep tro : sellit, nag a dermudiñ a-raok ober diskleriadur ebet diwar-benn taolioù-arnod Abati Boken, en eskopti Sant-Brieg.

Rak e Breizh ne deo ket gwelloc'h na falloc'h eget e lec'h all ! N'eo ket gouest an Eskibien o-unan d'en em glevout evit diazezañ ur gwir Gomision Etreeskoptiñ karget da ober war-dro al Liederezh e brezhoneg. Mar ne deo ket gouest an eskibien da reiñ skouer o-unan, penaos neuze klem a-enep taolioù-arnod beleien'zo ? An dud he ne dint ket eus ar re yaouankañ hag a zo bet stummet da sentiñ ha da heuliañ al lezennoù a gav diaes, met evel-se emañ ar stal bremañ.

Peplini en devez e dammig soñj war an oferinier a vez skingaset e brezhoneg da geñver ar Gouelioù bras. Mat ha brav e vezont kavet gant darn, un tamm liv ar floklor warno gant darn all, a gav abeg enno dre ma ne chom netra pe dost war o lerc'h. D'am meno, daoust d'o siou mat, d'o ferzhioù kaer a c'hellont da gaout, ar brasañ tamall a c'heller ober dezho eo emaint a-ziaev d'ar gwir vuhez pa ne glaskont ket diazezañ un dra badus, un dra unvan hag a c'helle bezañ degemeret dre vras en holl ilizoù brezhonek. Taolioù-arnod ? marteze.

Met keit ha ma c'hello ar veleien, herez an eskopti m'emaint, ober gant komzoù disheñvel evit kensakriñ Bara ha Gwin an Oferenn, ne vo tu ebet da grediñ emeur o klask diazezañ un dra da badout.

Evel ma vez lavaret : se ne ra ket sirius.

KLGER.

3

Bryngwyn, Deganwy, Cymru 5.V.1972.

(Al lizher-mañ skrivet e kembraeg a zo diwar bluenn an D-ell Vida Herbert, skolaerez kozh e retred. Lavaret em boa dezhi e oa bet ar B.B.C. e

Bulien, deiz Sul ar Bleunioù).

... Trugarez deoc'h da vezañ komzet din eus ar film kemeret du-se gant ar B.B.C. He me'lavar deoc'h em eus gortozet gant hiraezh. Setu a-benn ar fin. Skrivet em eus da Gerdiz da c'houlenn ma vo adtremenet ha ma vo diskouezet muioc'h eus hoc'h iliz. Ur blijadur eo bet din ho kwelout ha kaout an tu, e-pad ur pennadig, da bediñ a-unan ganeoc'h ...

En noz all, e oa bet mignoned din an Aotrou E.R. hag Ann, e bried, o rentiñ bizit din. Gwelet o devoa o-unan an abadenn diwar-benn Breizh. E-sell edont er bloaz-mañ da vont d'an Douar-Bras ha da veajiñ a-dreuz meur a vro (D.V.); bremañ o deus divizet mont da Vreizh hag emaint e-sell da gas deoc'h va gourc'hemennoù » ...

Vida A. Herbert.

Notenn : An D-ell-se eo a voe an hin gentañ o tegas he prof evit bez an Aotrou Kalvez. Bennozh Doue dezhi.

Diskouez a ra he lizher e c'hell servijout a-wechoù ar B.B.C. da vrudañ Breizh.

monument an Aotrou Kalvez

Prest eo raktres Monument an Aotrou Kalvez. Treset eo bet gant Tonig an TIMUER hag emeur o klask ur sulter evit ober marc'had gentañ.

Kasit eta ho prof dre chekenn-Brost pe dre chekenn-bank da Fañch Le Moal, Kroaz an Ti-Forn, Plouagat, 22 - CHATELAUDREN
K.R.P. 2 639 81 Roazhon (Rennes)
Mil bennozh Doue d'ar brofourien a youl-vat.

Stad Barr-Heol

Un toullad mat a skouerennoù eus BARR-HEOL war an Aotrou Kalvez (Doue d'e bardono !) a zo bet gwerzhet en tu-hont d'ar goumanterien. Un digarez ez eo bet evit reiñ da anaout hor c'helaouenn ha da gaout koumanterien nevez ! PA GASIT ARC'HANT : implijañ kentoc'h ar C.C.P. (K.R.P.)

LENNADENNOÙ PEMDEZIEK

LENNADENNOU PEMDEZIEK Bloavezh 2 : 19 - Vet - 26 - vet Sizhunvezh Liesskrivet ez eo evel al levrioùgoù all o reiñ al LENNADENNOU PEMDEZIEK evit ar Bloavezh 2. (gwelout taolenn an ambannadurioù war bajenn diwezhañ ar gelaouenn).

Moulet fraezh hag en ur yezh aezet ha glan war un dro.

GOULENNIT ETA al levrig nevez : 6, 50 Lur.
REVUE BARR-HEOL, 223000 LANNION en ur gas an arc'hant !

48

Embannadurioù BARR-HEOL

1.	Sulioù ar C'horaz (Bloavezh B) ha Sul Fask	5 Lur
2.	Sulioù ha Gouelioù ar Bloavezh B (Dre Offset)	8 Lur
3.	Leksional ar Bloavezh A (dre Offset)	15 Lur
4.	Levr-Oferenn evit ar Pemdez (Azvent-Nedeleg Epifaniezh (21x27))	9 Lur
5.	Levr-Oferenn - id - (Koraiz he Sizhunvezh Santel (21x27))	9 Lur
6.	Levr-Oferenn - id - (Amzer-Bask (117 paj. 21x27))	10 Lur
8.	Lennadennoù Pemdeziek (10 Sizhunvezh kentañ ar Bloavezh 2)	6 Lur
9.	Lennadennoù Pemdeziek (11-18 vet Sizhunvezh Bloavezh 2)	6 Lur
10.	Ritual ar Briedelezh (klok, 50 paj. 21x27)	6 Lur
11.	Ritual ar Vadeziant (roneoskrivet 10x12)	2 Lur

EMBANNADURIOU ALL

1.	Seurez Kerwenan ha Chapeled ar Plac'h Varv (mouladur nevez)	6 Lur
2.	Otello (tresadennoù gant an Timeur)	6 Lur
3.	Mervel evit Bevañ (Pezh c'hoari relijiel gant Saig ar Gov)	6 Lur

Goulenn an holl levrioù-se dre chekenn evel-hen :

Revue BARR-HEOL, 22 LANNION C.C.P. 245 453
K.R.P. 245 453 Roazhon (Rennes)

Merkit war gein ho chekenn ar pezh a fell deoc'h hag e viot sei vijet kerkent, hag erbediñ a reot amzer ar re a ra war-dro ar gelaouenn.

KOUMANANTIT DA VARR-HEOL

ur gelaouenn bev-buhezek moulet dre OFFSET !

KOUMANANT -BLOAZ : 20 LUR

da gas war-eeun da REVUE BARR-HEOL, evit 4 Niverenn.

Imprimeur : abbé Yv. Le Gall, Copie 22 Pédernek
Mouler : an aotrou Gall, person Pedernek

Directeur de la publication : M. Le Clerc, Buhullen, 22 Lannion, Gérant.
Renner ar gelaouenn : an aotrou Klerg, person Buhullen, 22 Lannion

Périodique inscrit à la Commission P.P.P. sous le No 29 746

